



Niv. 19
Nevez-Amzer 1941

TAOLENN

Pajenn 26, linenn 5, reizit, mar plij, evel-mañ :
Ar mor, siouaz, az dall hag az brall : sav, Gralon !

	Pajenn
D'al lennerien	3
Gant hentou meur ar Gwerzaoua	5
Enezenn Iz goueledet er mor, gant Y. AN DIBER- DER ha Y. AR GO	7
Gwerz Ker Iz	43
Gwerz ar Roue Gralon ha Kér-Iz	46
Pajenn ar yez :	
Ar GLOUED e brezoneg hag e kembraeg, F. VALLÉE	55
Geriou brezoneg beo, YEUN AR GO	55
An Oustacha ha dieubidigez Kroatia, KERLANN	59
E-touez ar c'helaouennou hag ar c'hazetennou	64
Keleier	65

D'AL LENNERIEN

D'ar maro e oa kondaonet ar brezoneg gant an dud fur : ne dalveze ket ar boan klask herzel ouz red an dour ; ne oa netra mui da ober evit mirout buhez yezig ar Vretoned. Evelse e soñje hag e komze kalzig bretoned klouar heñvel awalc'h eus an nizien a lavar dirak eun eontr gwall glañv : n'eus netra ken da ober, graet eo gantañ ; n'eo ket ni a zo kaoz ; gant doujañs hon eus komzet outañ bepred ; n'eo ket dre hor faot ma emañ o vervel. Ya sur, komzou kaer eleiz a lavare ar Ponsou-Pilat a vremañ en dro d'ar brezoneg war e dremenvan [war o meno], evit mougat mar-teze mouez ar goustiañs, mouez ar ouenn ivez, hag a rebeche d'ezo goustadik beza chomet diseblant dirak muntrerien ar brezoneg, pe zoken beza roet an dourn da dud fallakr evit seveni an torfed. Rak dibreder e choment o welout bugale desket d'ezo ober fae war yez o zud ; diseblant e welent merc'hedigou ha paotred zoken o lavarout, e galleg evel just : « O, me ne ouzan ket ar brezoneg ; biskoaz n'em eus gallet dont a benn da gomz ar yez-se ! »

Daoust d'o rannalon dirak seurt taolennou eun toulladig bretoned dispont ha kalonek a gredas koul-skoude stourm evit mirout buhez ar brezoneg, hag evit rei d'ezañ brud hag enor. E kreiz diruilh ar mor gallek e talc'hent penn, e talc'hent start hag e kavent tud d'o heuilh ha d'o skoazella evit difenn ar yez, he c'hrenvaat, ha darbari d'ezi gounidou nevez.

Lorc'h ez eus ennomp ni Saverien, da veza heuliet

ha roet hon tammig skoazell d'an dud souezus-se, hag a grede derc'hel penn ha kaout fiziañs, en desped da bep seblant, e amzer da zont ar brezoneg.

Ha petra a welomp bremañ : diouz eun tu kalz a dud losk hag o doa kondaonet ar brezoneg d'ar maro, a glever bremañ o lavarout : « n'ouzoc'h ket, emeur o vont da zeski bremañ ar brezoneg ? » Ha diouz an tu all, enebourien ar brezoneg hag a c'hoarze gant fae dirak hol labour, o c'hoarzin glas hizio, hag o kazkana.

P'emañ eta en arvar ha war vrall an dud deseblant hag enebourien ar brezoneg, anat eo hon eus lec'h ni, brezonegerien, da gaout muioc'h a fiziañs eget biskoaz.

Arabat koulskoude fazia ha kredi en em raio an traou outo o unañ ; an trec'h a gar beza skoazellet. Ne vo ket adgounezet an dachenn gollet en eur gouskat ; labourat kalet e vo ret ober ; hag a gevret.

N'emañ ket bremañ, nebeutoc'h eget biskoaz ar mare da selaou ar re a glever o lavarout : nep-mañ nep ne blij ket d'in ; heñ-mañ heñ a zo evelhen ; araok barn ar re o deus graet eun dra bennak eo ret, d'am meno, beza graet muioc'h egeto ; nebeutoc'h eget biskoaz ne vo kollet amzer o selaou randaelou nep a vrall e gloc'h e unan, gant aon na zeufe e soñj den all ebet bralla anezañ. An hini en deus nerz da zispign n'eo ket klask tabut ouz heñ-mañ-heñ e tle ober ; ra ziskouezo e nerz hag e ampartiz war dachenn ar stourm evit ar brezoneg.

Tostoc'h eget biskoaz emañ da veza sevenet an uhelvennad en deus heñchet hor buhez betek-hen. Ar feiz ha n'he deus ket graet diouer d'eomp en eurion a drubuilh a dle hor skerijenna hag hor c'hennerza, evit ma vo, a benn ar fin, an trec'h gant ar brezoneg e Breiz.

H. AR SPERNEIER.

Gant hentou meur ar Gwerzaoua

(Maodez Glanndour)

da reiz

Niverenn 18 SAV, pajenn 34

E-lec'h :

« Bez' ez eo kenveriadur an traou... »

Lenn :

« Bez' ez eo keñveriadur an traou e kement hag heñvel ha disheñvel war eun dro, keñveriadur ar boudou kenetrezo en o leunder gwirion. Rak pep boud ez eus ennañ e keñver ar re all heñvelder ha disheñvelder disrannus er gwirvoud. Nen eus boud ebet, e gwirionez ar bezoud, na vefe nemet par gant eun all, pe nemet dibar gant eun all. Ha war dachenn an ober ez eo ivez ar gened al lezenn veur : rak en oberez ar boudou ez eus heñvelder ha disheñvelder war eun dro e keñver o finvezioù gallus... »

ENEZENN IZ GOUELEDET ER MOR

Danevell aozet ha kempennet,
hervez skridou brezonek an Amzer goz,
ha kredennou beo tud Kerne,

gant Y. an DIBERDER
ha Y. ar GO.



ENEZENN IZ GOUELEDET ER MOR

*Ar mor 'zo digoret,
diredet d'o metou...*

(Eur barz dizanav.)

« Aucuns ont écrit que durant la vie de ce Roy Grallon, la ville d'Ys près Quimper fut abysmée et submergée par la mer ; encore aujourd'hui les habitans montrent les ruines, et le reste des murailles si bien cimentées, que la mer n'a pu les emporter, disans que le Roy Grallon estoit lors dedans quand elle ruina, et que miraculeusement il fut préservé par les prières de saint Guingaloy. Ce sont là accidens, lesquels par submersions de mer, sont souvent advenus ailleurs, et Dieu conserva Loth de semblable fortune ; mais de cela il n'y a pas de seurs témoignages, ny autre qu'un vain bruit baillé de main en main. »

D'ARGENTRÉ.

Eur gêr e oa Iz, hag ivez eun enezenn, hag a oa bras meurbed. Bez 'he devoa nao leo hed. Pelloc'h en em gave ar penn pella anezi en dounvor eget Beg ar Raz, hag en em leda a rae tre e-barz mor Douarnenez. Lavarout a raer e oa kelc'het gant eur voger arem ; e lec'h doriou he devoa daouzek skluz, eur mell hini anezo, o tigeri war eun islonk a oa anvet ar Puñs.

Enez Seun, e-giz m'emañ bremañ, a oa eur barrez a-ziwar-dro, hag a oa stag outi. Pa veze tre, e c'helled mont eus an eil enezenn d'eben gant eur chaoser-pavez. Gwelout a raer c'hoaz ar vein-ben anezañ a-dakadou, dindan an dour, pa laka reverzi Sant Wenole, (hini miz meurz), ar mor da zichala.

En e vrasa e vez hemañ pa zigouez ar reverzi-se da Wener ar Groaz. Ha da geñver eur seurt devez eo, e c'hoarvezas an darvoud skrijus. An deiz-se ec'h izela kement ar mor ma 'z eo eur souez. Nep a vez eno da vare an dare a c'hell gwelout, a dra-sur, dismantrou paleziou ha mogeriou Iz, hag ar pezh a chom eus an hent pavezet a gase da Seun. Bez 'e c'hell gwelout, ouspenn, roudenn an alez wez ha beuz hag a yae, dre war-c'horre eur chaoser a oa e-rez ar mor, adalek Iz

betek an douar bras, en eur dremen e-biou chapel Laoual. Houman, bremañ, a zo dindan an dour, e goueled Pleg-mor an Anaon. Nep piou bennak, koulskoude, a vo dispont a-walc'h da vont da glask penn eus Kêr Iz e-pad an tre bras, p'en em gav reverzi Sant Wenole, e vo arabat d'ezañ dale, ha lijer e ranko beza. Dibaot eo ar re o deus gallet dont en-dro, ma 'z eus unan hepken hag a zo deuet, abaoe m'o deus soñj an dud a zo o veva war an douar.

Rak kerzout spontus a ra al lano, kounnaret-holl. Eun tarz-mor glas divent o rodella, (hag evel bleo gwenn o fuilha diwar e gern gant nerz ar gorventenn), a red er renk kenta hag a ginnig diskara kement tra. Krena a ra neuze enez Seun, evel m'he deus krenet gwech-all. Savetaet e voe diouz ar gwall-reuz a zistrujas Kêr Iz, met kredi a reas edo o vont da goll. Bep eun tammig e tiskennas er mor, re bar d'eul lestr o kemerout dour hag o vont da c'houeledi. M'he devoe an eurvad da chom e-rez an dour ne d'eo, a lavar ar re-goz, nemet abalamour da lean santel eur peniti, a oa eno o pedi. A drugarez d'ezañ e tavas kounnar Doue. Met, hervez eun darn-all eus an dud, paneve d'eur soñj a zeuas da Zoue, ne vije ket bet selaouet muioc'h ouz e bedenn eget na voe graet ouz hini Gwenole, ha n'en devoe ket ar galloud da savetei kêr. P'edo o vont da gas Seun da c'houeled ar mor, e reas Mestr ar Bed ar menoz da virout an enezenn a oa war-nes beza lonket, (hag a zo war var bepred, hiviziken, da veza distrujet), evit ma vije, a-hed an amzeriou, eun testeni padus eus ar blanedenn garo a laakas da goueza war Iz, kêr villiget.

*
* *

Eur mare a oa bet, koulskoude, ha ne oa netra da damall da Gêr Iz. Eur skouer a zoujañs hag a garan-

tez e-keñver Doue e oa bet, evit ar parrezioù a-ziwar dro. Daou ugent aotrou pinvidik d'an nebeuta, hag eus ar re uhela e-touez an dudjentil, hep ober meneg eus ar re-all a ouenn izeloc'h, a yae bep sul a-rummadou bihan d'an oferenn da Laoual, e lec'h n'eus mui bremañ nemet eul lenn. Mont ha dont a raent dre an alez veuz ha gwez, bep a vantel ruz stennet en dro d'o c'horf, pe o strakal gant an avel-c'hoañv a-dreñv o c'hein. Diouz an hañv e herpent (1) a-wechou, da gomz etrezo en disheol. Lïes-gwech e kavent eun den santel war o hent hag e saludi a raent. Hennez a oa Gwenole, perc'henn Enez Seun ha niz roue Kemper. O vont da welout e zouarou e veze Gwenole, pe o tistrei d'ar gêr goude beza bet oc'h ober eur gwel d'ezo. Gwech a veze, e yae tre d'an douar bras betek e vignon Sant Kaourintin. Tremen a rae d'an eur ma kare, rak n'edo ket diaes gant izel-vor na gourlan. Pa veze tizet gant al lano, e kerze war ar mor, rak bet en devoa digant ar C'hrist ar galloud da vale war an dour.

Met, dizale, e teuas an traou da cheñch penn buantre. Gralon, roue Kerne, deuet da veza koz, ha gwalc'het gant gloar ar brezelioù, en devoa lakaet Sant Kaourintin da eskob, ha roet d'ezan kêr-glos Kemper hag e balez e-unan. En em dennet e oa en Iz, ar gêr binvidik ken bras he forz, hag a oa difennet ouz an enebourien gant ar mor, hag ouz ar mor gant he skluzioù arem. Da heul Gralon e oa aet di tud e lez, hag, ivez, e verc'h Ahez, lintrus-meurbed e-touez ar re a oa en dro d'ezi. Ne oa paotr yaouank pinvidik ebet ha na glaske ket an tu da dostaat outi. En em voda a reas war he zro, evel-se, eul lez tud diboeil, o veva e kreiz an dispignou, ar plijadurezioù hag an dizurz. Evit kaout arc'hant e veze skarzet o yalc'h d'an dud,

(1) Chom a-zav.

ha graet preizerez diwar o c'houst. An holl dud onest a oa gouest da dec'hout a gerze kuit. E-pad an amzerse, e kreske brud fall kêr Iz, hag eun engroez divroidi pinvidik ha gadal a zirede betek enni. Ne wele ket ar roue koz, kalz re-laosk ha re-lezober e keñver ar yaouankiz, grevusted an droug, ha ne enebe ket. Edo Iz o rei gwall-skouer da Vreiz a-bez.

N'eo ket hep gouzout dare da Wenole e kreske an diroll hag ar gwall-dechou pagan e-barz ar gêr re-binvidik. Dourn kalet ar roue koz, ken doujet kent, en devoa kollet darn eus e nerz hag e startijenn. Daoust ha n'edo ket lidou ar falsdoueou o vont da gaout an trec'h adarre ? Graet en devoa Gwenole ar soñj da gemenn d'e contr ar pez a dremene. Da zeiz gwener ar Groaz eus ar bloavez-se kollet hag ankouaet, abaoe keit-all 'zo, e kreiz puñs an amzer-dremenet, eus ar bloavez-se e-lec'h ma tegouezas Pask tro mare reverzi miz meurz, ar pez a zo dibaot a-walc'h, e voe darbet, avad, d'an abad santel kaout eur fallaenn gant ar strafuilh hag ar vez. Ouspenn ma oa goullo an iliz ha ma edo ar beleg, harpet e gein gantañ ouz an aoter, o c'hortoz, evit lavarout e oferenn, e teuje unan-bennak d'he respont, e oa anat ha sklaer edo kêr a-bez oc'h en em rei d'ar vrasa dizurz.

E kement ti a oa, ne glevet nemet kanaouennoù ha c'hoarzageg ; en holl ruiou, ne weled nemet bagadoutud laouen o tremen. Taeri a reas ar sant, ha ne dec'has ket diwar o hent, daoust d'ezo da c'hoarzin goap outañ. Gant nerz an engroez o vont hag o tont e troidelle, du-mañ, du-hont, an den a binijenn ken rust e neuz gant e wiskamant krec'hin geored. Met, en eun taol-kont, e c'hellas en em zistroba a-douez an dud. En em zifreta a reas hag e kerzas, dre greiz an holl, en eur vleukata hag en eur skei. War eur maen-bonn e pignas, hag e prezegas dichek d'ar re a oa dirazañ. Didruez e oa da genta, hag e gomzou en-

tanet a flemme. E zremm a oa ruz-glaou gant an droug a oa ennañ. Digas a reas da soñj pegen santel e oa an deiz-se, hag an dud ouz e selaou a voe alvaonet da genta ; met dizale, ec'h en em lakajont da c'hoapaat. En derc'hent, emezañ, en devoa bet eur weledigez ha ne oa ket evit gouzout pe ziougan a oa ganti. Gwelet en devoa ar mor glas o veuzi eur gêr, ha dihunet e oa bet, e kreiz e gousk, gant ar spont. Bremañ, avad, e wele sklaer e oa Iz, ken dirollet en he fec'hed, ar gêr-se gouestlet d'an distruj ha d'ar maro. Kredi a rae e oa deuet d'ezañ a-berz Doue ar soñj da vont da gemenn ar gwall-zarvoud da dud ar gêr gollet. Mall, mall-bras eo d'eoc'h kaout keuz d'ar pez hoc'h eus graet, tud Kêr Iz ! Selaouit mouez an den a zo kaset betek ennoc'h gant Doue, an Aotrou. Pellait diouzoc'h planedenn Sodom ha Gomôr ; tec'hit diouz an tonkad a zo kemennet d'eoc'h en o skridou gant ar vrasa sent, gant diskleriourien traou kuz al levriou sakr.

Ha dre ma prezege, e tistane d'e gounnar hag eur feiz virvidik e darze eus e gomzou. War e veg e pare a-nevez eur vadelez divuzul. E zremm a oa habaskaet, hag evel bannou santelez a steredenne diouti. Komz a rae bremañ gant douster, hag e pede Doue a greiz kalon ha gant eur feiz dispar. Ne wele mui ar mousc'hoarzou-skrign o para war ar begou fardet ; ne gleve mui an dud-se o klask trouc'ha d'ezañ e brezegenn gant komzou godisus, hag o c'hoarzin diwar goust an hini a gemerent evit eun istrogell pe eun den foll, hag a oa ken fentus war o meno. Met gwallsebezet e voe kerkent ha ma tavas da brezeg.

Diouz an engroez dirollet e tarze, bremañ, stlakadennou-daouarn goapaüs, c'hoarzagennou, hag ivez, skrign ha luc'hachou ha, dizale, kaoziou dismegañsus. Ar merc'hed, o kinnig taga gant ar c'hoant-c'hoarzin, ne ehanent ket outañ gant o zaoliou-teod.

Meur a hini, staotet o mez ganto, a oa en em lakaet da glask reo outañ gant komzou divergont ha lous. Ar vourc'hizien, dreo an tamm anezo, a oa kroget da lavarout kunujennou d'ezañ.

Met kaer o devoa dibuna traou kasaüs, hag, ouspenn, dismegañsi ha goapaat war eun dro, Gwenole a bakas e anal a-nevez, ha nerz-kalon a zeuas d'ezañ adarre. Ne vennas ket klevout ar pezh a lavared d'ezañ. Aspedi start a reas an dud, en-dro, da heulia e aliou ; bep eun tamm e kreñvaas e vouez, ha dizale e krozas evel ar gurun. Lavaret e vije bet edo kounnar Doue o tont da gomz dre e c'henou.

« Mat a vefe d'eoc'h, kement hini ac'hanoc'h a zo en Iz, tostaat difrae ha gant furnez ouz Doue, gwir roue an neñv, goude beza kovesaet ervad. Ha grit pinijenn, me an hini eo hel lavar d'eoc'h ! Eun dra bennak a zo o vont da c'hoarvezout ; gwaz a ze evidoc'h, pa zigouezo d'eoc'h gouzout eo gwir kement-se ! Re-ziwezat e vo neuze. Kerzout trumm a ra an Ankou bepred ; en em gavout a ray dirazoc'h evit ho samma, goude beza tizet ar paour kaez tud a zo war an douar-mañ. Gwall-gastizet e vo enezenn Iz ; he gwelout a reoc'h aet rac'h, e nebeut amzer, a-zirak ho taoulagad eus al lec'h m'emañ bremañ, ha mervel a ray ar merc'hed, kerkoulz hag o gwazed, dindan samm o fec'hedou. Beuzet e vint holl, en eun devez hepken, gant ar mor dirollet ; hemañ ne fazio ket.

« *An mor goues o beuzo, un dro, ne chomo ket.*

« Kemennet eo bet an dra-mañ fraes ha sklaer gant roue an neñv. Iz, ar gêr-mañ, a vo gwanet dizale, a lavaran. Eun devez e tiskenna e-barz an douar, e-lec'h m'emañ he diazez, ha goloet e vo gant ar mor bras, hep dale pell. En abeg d'ho puhez direol e c'hoarvezo an darvoud-se. Rak-se en em droit krenn ouz Doue, c'houi holl, tud fur ha tud foll, gant aon ouz eur seurt distruj. En em virit diouz ar pec'hed,

ho pet keuz d'ar vuhez hoc'h eus renet. Evel Ezekiel gwech-all, e kemennan d'eoc'h holl eo deuet pred al leñv hag an daelou ».

Diskorda a reas an holl da c'hoarzin dirak ar paour kaez sant ken iskis da welout, gant e benn hanterdouzet hag ar vaz souezus a oa gantañ en e zourn. Ha teodadou lous ha flemmus a voe taolet d'ezañ adarre, gant ar vourc'hizien laouen ha diseven.

« Petra 'lavar ? Daoust ha Kêr Iz a rankfe gouzañv eur blanedenn seurt da hini a gouezas war Sodôm ?

« *Chetu dyouganou bras, dymp glas, gant un asen* hag a zo pasket d'eomp didroidell, gant unan ha na oar den gant piou eo bet ganet !

« Re-abred, manac'h, e fell d'it komz d'eomp eus traou ken amzere. Ha Kêr Iz a c'hoarvezfe ganti eur seurt reuz ?

« *Lavaret es ve Ys a duhe en quys-se ?*

« *Ha chuy, beulkyn, sotyn, ve a determyne*

« *E coeshe hy en goal, fal asen evalse ?*

« Ha te, beulz, arziod, an hini eo a lakafe ar wäl-len-se da goueza warni, azen fall a zo ac'hanout ? Dre an despet d'az fri, ha pa vefes Heliaz e-unan, e vevin seder hag hervez va c'hoant. Ha kae da beuri, te, war c'hlazenn an hent, rak den ebet n'az prijio e Kêr Iz.

« *Den a Ys nez pryso, dyzro, quae daz bro scaf.*

« Ha gant ar c'hoant da ouenna dre amañ ez oute deuet da ziskleria d'eomp traou ken fentus ?

« *An merchet a geromp ouzyt ne leveront quer !* Piou bennak az selaoufe a yafe gant ar vez.

— « Ya, moarvat ! » a asantas ar pec'herezed en eur c'hoarzin o gwalc'h. « Kae d'an alez ; kae tre betek gwezenn ar groug. Ni, avat, n'hor bo mez ebet o rei d'ar wazed hor c'har ar pezh emaint o klask kaout diganeomp ». « Me, diouz va zu », eme c'hoaz

unan anezo, « am eus unan ha n'eo ket divalo tamm ebet. Emaoun o vont d'ober eun abadenn-dañs dirazañ.

« *Gant map e tat ez ebatyf !* »

— « Peogwir ne c'hellan ket ober netra muioc'h evidoc'h, daoust d'am c'hoant », eme Wenole eur wech-all c'hoaz, « n'em eus, a dra-sur, nemet mont ac'hann. Ho leuskel a rin aze, strollad tud fall a zo ac'hanoc'h. Met Doue, an hini eo, a zeuy dizale d'ho kastiza. Iz! Iz! te hag a zo eur gêr ken dispar ma ne c'hellfe ket beza kavet unan-all evelout, roet em bo d'it da c'houzout ar pez a dle c'hoarvezout ganit, e gwirionez.

« *Dyde Ys peur dyspar, hep mar, en lavaraf !* »

*
* *

Eun taol c'hoaz e krozas e vouez evel-se, ha goude e tiskennas diwar ar maen. An holl, o c'hoarzin bepred, a droas kein buan d'an hini na oa, war o meno, nemet eur paour kaez diskiant. Falvezout a rae da Wenole, koulskoude, kas kelou d'ar roue. Kerzout a reas, sounn e benn ha divrall en e youl, etrezek ar palez, met ne voe ket pell o welout e oa eno eur fest ha na c'helle nikun-all ebet beza keñveriet outi. Eur mell banvez a oa e sal vras ar palez, e-lec'h m'en em gave, eun engroez prederien hag a oa gourvezet, hervez giz ar Romaned, dirak bep seurt meuziou staliet en o c'hichen. Aotrouned, pennou-bras ha tud pinvdik Kêr-Iz, a oa holl eno, hag ivez eun nebeut mistri-mor a-ziavaez bro. Gralon, hegarañ d'ezañ hag eun alc'houez aour munut en istribilh ouz e c'houzoug, a oa azezet war e gador olifant o ren ar fest. War bouez nebeut dioutañ edo Ahez, dilhad graet gant danvezioù deuet eus broiou ar Sav-Heol en dro d'ezi, hivizou seiz gwenn ha satin moug dindan eur gorkenn

verr serret gant klochedou prigwer hag aour. Fichet e oa he zal gant mein prizius ha perlez. Harpet edo ouz skoaz eur priñs yaouank divroad, ken kaer ma oa sebezus e welout, hag enkrezus sellout outañ. A-wechou e komze e pleg skouarn Ahez, hag houmañ a serre he daoulagad evit rei d'ezañ da c'houzout ec'h asante d'ar pez a lavare.

O veza ma oa bet desket diwar e goust gant ar bobl en devoa kavet e kêr, ne glaskas ket Gwenole lakaat da zistrei war an hent mat an dud a oa bodet eno, ken laouen-all d'ezo. Eur sell trist-meurbed a daolas warno, hag e kerzas war eeun etrezek Gralon, hep beza nec'het an distera gant kuzuligou ha c'hoarzedennou an dud-se, souezet-holl ouz e welout gant e gern-veleg hag e goz dilhad krec'hin-geored.

« Kement-mañ », emezañ d'ar roue gant eur vouez glac'haret, « kement-mañ eo a vez graet e-barz da gêr, ha war wel d'it zoken ? Ha n'eo ket a-walc'h, 'ta, bresa ar re-zister en eun doare didruez, mouga pep gwir er rouantelez perc'hennet ganit, diframma o danvez digant ar re n'int ket barrek d'en em zifenn, gwelout o tec'hout hep dont en-dro ar re a zo gouest da vont kuit, leuskel ar vreinadurez hag an dizurz da zirolla, pa ranker, ouspenn, lakaat an holl draou-se muioc'h eget biskoaz dirak daoulagad an holl, eun devez evel hemañ ? Hag ankouaet ac'h eus, 'ta, pe zevez a zo hirio ? Ha na c'houzout ket penaos e vo kastizet da gêr ? Falvezet eo bet d'in kemenn ar gwall-zarvoud-se d'az pobl, met n'he deus ket selaouet va c'homzou. N'he deus graet nemet va dismegañsi ha c'hoarzin goap.

« *Ne duhyf muy byzhuyquen da prezec guer en Ys.*
« *Doe a duy do dyhun commun ha do punys ; ...*
« *Ha goae huy byzuyquen an den chomo en Ys !*

« Ha, koulskoude, hel lavarout a ran d'it, emañ

ar Maro o tostaat hag ar Mor o tiredek : dizale, emberr marteze, e vo kollet da gêr ».

Mantret e voe ar roue koz, ha stoui a reas e benn, evel ma vije bet re-vec'hiet dindan samm e bec'hed.

« Ankouaet em boa an devez santel-mañ », emezañ. « Ne grede ket d'in e oa en em gavet c'hoaz. Koz oun, ne lavarar ket d'in kement tra, ha gouzout mat a ran ivez na senter mui ouzin. Klask a rin mont d'ezo eur wech c'hoaz ».

Poania a reas da lakaat an dud da devel, hag e krogas da gomz evel-hen :

« C'houi holl hag a zo amañ, selaouit ar c'han-nad deuet a-berz Doue. Ken gwas hag eun torfed eo ar fae a rit war ar feiz hag an traou santel. Ho pet keuz d'ar pezh hoc'h eus graet, keit ha ma 'z eo c'hoaz a-bred a-walc'h : tostaat a ra ar c'hastiz, emañ ar mor o tont... »

Met ar c'homzou goapaüs hag ar c'hoarz a oa savet, o devoe an trec'h war vouez ar c'hoziad.

Sounna a reas c'hoaz ar roue koz e gein.

« Ankouaet hoc'h eus pe zevez a zo hirio », emezañ. « Kuzet hoc'h eus kement-se ouzin. Deuet eo, dre eurvad, an den santel-mañ da zigas eñvor d'in eus ar pezh a oa nijet diouz va spered. Paouezit gant ar fest-mañ ; ho pet keuz d'ho puhez dremenet evel-doun va-unan : kemenn a ra d'in an den-mañ digaset gant Doue, emañ ar c'hastiz o tont, ar mor o tiredek... »

Ne reas an engroez ven ebet dirak neuz doujus ar roue koz, sounn bepred en e sav.

Unan eus an dudjentil a oa eno a lavaras, tost d'ezañ, o lakaat an dud-all da ziskorda a c'hoarzin :

« Poh ! mar teu ar mor e vo pesked ! »

Gwenole, d'e dro, a reas eur gammed war a-raok, ha gant e vouez, ken galloudus pa veze o prezeg, e klaskas trec'hi war ar safar :

« Pa vo digouezet ar mare » emezañ, « e teuy ar mor bras, splann ha boul, hag e nerz a lakay kement tra da godiana gantañ. Gwaz-a-ze, neuze, da nep a chomo en Iz ! »

Ar wech-mañ, avat, e savas an hu. Bec'h he devoe Ahez oc'h herzel ar priñs divroad a oa savet diouz he c'hichen, hag a oa o klask e c'houstilh da skei. Azeza a reas en-dro hag e c'houlennas c'hoaz outi a vouez izel hag hen e roje d'ezañ he ger da seveni eun dra hag he devoa gouestlet ober : en eur finval he malvennou, ec'h asantas Ahez adarre.

Gwenole, rannet e galon, en em droas war-du Gralon.

— « Roue », emezañ, « nac'h a ran, ne c'hellan mui. N'eus doare ebet d'o lakaat da drei kein d'ar pe-c'hed. Me an hini eo a zo tamallet ganto dirak an holl. Mont a ran kuit. Komz a rin ouz va zud ; amañ ne ra den stad ebet ac'hanoun. Met Doue e-unan eo a zeuy d'o dihuni ha d'o gwana, holl a-gevret.

« Roue Gralon a zo en Iz, bez war evez, rak didrouz e teuy ar c'hastiz, hag en eun taol berr e tirollo. Teir gwech e kano ar c'hilhog, koulskoude, evit kemenn d'it kement-se.

« *Quantaf can an quyliec, neuse hep dyeguy,*

« *Saf ardant...*

« Ar wech kenta ma kano, sav hep dale, en em laka e tu da dec'hout, lavar kenavo da viken d'al lec'h m'emaout o chom.

« *An eyl guez pan clevy, da march a ausy scaf !*

« Pa gano evit an eil gwech, laka dipra da varc'h raktal, hag, hep ober an neuz da gaout mez, bez prim da lammat war gein da loen.

« *Pan cano dan teyrvet affet hep arretaf*

« *Ez quemery vayllant an hent ardant gantaf.*

« D'an trede taol-kan, hep herpel tamm, kerz en

hent gant tiz ha mall. N'az po nemet va gervel : dont a rin d'az skoazella ».

Hag endra ma yae kuit ar Sant, e komze Gralon evel-hen :

- « *Autrou Doe, gwyr Roe an bet,*
- « *Truhez ouz ma buhez hoz bezet,*
- « *Doe, gwyr pylyer, ma myret*
- « *Ouz an punysson so oz donet.*
- « *Autrou, sellet ma pechedou*
- « *A byzcoaez, ha ma follezou.*

« An hini a oar kement a draou ne c'hell ket lavarout gevier : war-eeun da goll e ya Iz, ar gêr-mañ, » emezan.

— Bo ! perak an dra-ze ? » eme ar re a oa an tosta d'ezañ ouz taol. « *Kalz a leveromp ha na reomp ket* », emezo c'hoaz, hervez ma lavar ar skrid koz.

*
* *

Deuet e oa an abardaez, edo an noz o tont. Tostaat a reas Ahez ouz he zad. War vrec'h-olifant ar gador ec'h azezas, hag en em lakaat a reas da lubani ouz ar c'hoziad. Eun hanaf a ginnigas d'ar roue, hag hemañ a evas dioutañ. Eur vrec'h he devoa lakaet Ahez en dro da gerc'henn he zad, hag e c'hoarie gant an alc'houez aour a oa en-istribilh ouz e c'houzoug. E ziboueza a rae, hag he sellou a bare warnañ. Bez 'e oa an alc'houez-se eur c'haer a bez-labour, bet roet e prof ne ouie mui den gant piou. Merk ar stad a roue e oa en Iz, bez 'e oa an arouez anezi, ha meur a zen koz a lavare e oa ivez eun dra hag en devoa eur galloud burzudus. Gantañ e veze digoret an irc'hier e-lec'h ma veze miret alc'houeziou bras ar skluziou arem. Gant ar re-mañ e tigure ar roue e-unan skluziou ar mor, da zeiz eur gouel a veze lidet kaer-meurbed eur wech ar bloaz : met ar mor ne freuze netra,

ne gerze ket larkoc'h. Setu perak e oa re goz hag a lavare e, oa an alc'houez aour eun dra dreist-natur, bet fiziet e roue Iz gant Speredou galloudus ha kevri-nus ar mor ; ha paneve d'ezañ ne vijent ket bet gwarezet ganto. Mar tigouez gantañ beza dianket, eme c'hoaz ar Re Goz, mar kouez etre daouarn tud fallakr, speredou galloudus ar Bed na c'hellomp ket gwelout, ne gendalc'hint ket ken da zivall Iz, hag ar reuziou gvasa a c'hoarvezo.

Moredet e oa ar c'hoziad. Edo krog Ahez bepred en alc'houez aour. Goustadik hen distagas, hag her c'hinnig a reas d'ar priñs divroad a oa tostaet hag a oa o c'hortoz. Diframma a reas hemañ an alc'houez, herr ha ganas, diouz daouarn Ahez : « D'al listri ! », a hopas heñ d'ar re eus e dud a oa eno, hag e redas da gampr an irc'hier. Kerkent ha tra e kanas ar c'hilhog.

En eun taol-krenn e tibunas Gralon, skoelfet-holl.

« Ar Mor ! ar Mor ! »

« *Mor cruel a guetaf, an trous a clevaf spes !* »

« Gwelout a ran ar mor kriz o tont, klevout a ran fraes ar safar a zo gantañ ! Ripet eo bet va alc'houez ! An holl, tudjentil, bourc'hizien, bourc'hized, a zo o vont da veza beuzet en Iz. Bremañ e kollo, war eun dro, an oriad hag e vestrez o buhez ! »

Hag e kerkas etrezek an digor. Paouez a reas ar brederien, souezet.

Eun eil gwech e kanas ar c'hilhog. Kenderc'hel a reas Gralon da gomz, evel ma vije bet oc'h huñvreal :

« Ankeniet-bras oun ha c'houezi a ran gant ar mall a zo warnoun ! Gwelout a ran ar mor o tont diouz an daou du.

« *Aet ynt oll en un stroll, an foll gant an folles.* »

« Gwenole, klev va mouez ! Setu deuet ar mare, a gredan, evel m'ac'h eus lavaret, ha n'ouzon ket da be lec'h tec'hout ».

Redek a reas trumm war-du e varchosiou, hag ar brederien a savas, nec'het-bras.

Eun deirvet gwech e kanas ar c'hilhog. En eun taol-krenn, eun trouz bras-meurbet a strakas, evel hini rodell eur wagenn o koueza warni hec'h-unan.

Eur skrijadenn a dregernas e-barz sal ar fest : « Ar skluziou 'zo digor ! » Buntadeg ha kemmesk e savas e-touez ar brederien etre an taoliou-boued, met gwall-zivezat e oa. Eun avel dirollet a c'houeze diouz tu ar c'hornog, hag a gase ar mor dirazi. Pa oa bet falvezet d'an divroad digeri paliou ar skluz vras evit ma c'hellje e listri dont tre, e oa disac'het ar skluz a-bez. Bremañ e tisac'hent holl, hini a hini, hag o strakadennou a veze klevet, hep eur mare, e kreiz trouz an tarziou o yudal gwasoc'h-was. Al lano, en eur voudal, en em daole gant tiz e-barz ar gêr divent, ar pezh na rae ket morse kent pa zigore ar roue an doriou da zeiz ar gouel a veze lidet hervez ar c'hiz. Liñvet e oa lennou ar porz ha beuzet ar c'haeou ganti an dour. En o foull e koueze an tiez gant nerz ar mor dirollet. En aner e klaske kêriz an tu da dec'hout kuit ; en em flastra a rae eun engroez-tud e-barz ar ruiou striz. En eur grial skrijus, ankenius, edont holl oc'h en em voustra didruez, an eil o tiskara egile, ar wazed o teurel ar gwraez d'an douar, an tadou o vresa ar vugale, — holl o klask tec'hout, o klask tiza an alez veuz, o klask toulla an engroez war dec'h. Buanoc'h egeto, war o lerc'h e tostae trouz spontus ar mor bouzarus, o ruilhal, gwenn en noz, en eur yudal. E kreiz an dec'herien edo Gralon war varc'h, paour kaez roue koz trec'het, heno, paour kaez koziad leun a enkrez, o komz outañ e-unan :

« Ménez Com, mar chomaf, ne allaf tyzaf quet ! »

« Ménez-C'homm, ma zalean, ne vin ket gouest d'e diza. Setu va c'hêr gounezet gant ar mor. Ha me,

daoust ma 'z eo ret difraea, a zo chomet re hir amañ.

« *Guenole, Guenole, Guenole, ma clevet !* »

Unan-bennak, koulskoude, a oa o vont a-benn d'ar re genta a oa o tec'hout, eur gwaz, gwisket-fall gant krec'hin geored, hag a skare war-du ar palez. Gant e vaz penn-kamm e skoe war ar warded a oa o skampa kuit bunt-divunt. Diframma a reas diouz o daouarn eur marc'h dipret a oant o kas ganto, hag e tizas eur marc'heger hag a dec'he, hep gouzout dare etrezek pe lec'h : Gralon e-unan.

« Klevet em eus da c'halv ha diredet oun », eme ar Sant. « Kerz prim gant da loen hep kaout aon ebet : da vleina a ran ».

Hag e sailhas feuls e kreiz an engroez o tec'hout, e kreiz an engroez-se ha n'en devoa ket falvezet e selaou diouz ar mintin. E bedi hag e aspedi a rae bremañ an engroez-se ; an dud a astenne o divrec'h etrezek ennañ pa yae e-biou d'ezo ; re zivezat e oa, ne c'helle mui ober netra evito. A-benn neuze e c'houneze an dour. En em sila a rae e-barz ar ruiou. Eun tarz-mor o krozal a zeue war-lerc'h en eur ruilhal gant trouz e gern gwenn rodellet, en eur strakal ouz an tiez, en eur ziskara ar mogerioù. Beuzet e oa an alez veuz ha gwez a gase da Laoual. Ret e oa tec'hout etrezek lec'h-all, dre an aod ha na oa c'hoaz goloet, a-benn neuze, nemet gant eur gwiskadig dour hepken.

« War an traez, d'an daoulamm ruz ! » a hopas Gwenole ar c'hreñva ma c'hellas. « Ne vo nemedout d'en em denna ac'hann ! »

Kemerout a reas e diz hag e tistroas e benn da selout war e lerc'h : ne oa den ebet mui.

Gralon n'hen heulie ket ken. Bremañ edo heñ e kreiz an traez, o klask tec'hout raog ar mor, hep dont a-benn d'hen ober. Komz a rae atao outañ e-unan. En

eun dournskrid koz ha n'eo ket bet moulet bis-koaz, skrivet gwech-all gant eur barz ampart ha n'en deus ket roet d'eomp e ano da c'houzout, — nemet Laurans ar Richou a vije — e welomp displeget kaer-dispar anken ar roue, o lavarout d'ezañ e-unañ ha d'e vare'h brevet gant ar skuizder :

*Amañ sur e veuzin. Kerz bepred vijilant !
En an' an Eternel a zo holl buissant,
Gant ar mor en eun eur ez eo Iz konkeret,
Allas ! hag an douar, kêr, ha pobl konfontet !
Ar mor holl a bep tu 'fell d'ezañ ma beuzin !
Allas ! me am eus aon, amañ sur e chomin.
Terribl eo kourajus : ne chom en plas ebet.
Ar mor hon harz, allas ! Me 'gred ez omp beuzet.
Mar gellomp, deomp bepred ! Ne fell ket arretan.
Gant kalz rec'hel kalet, te a rank diskuizan :
Birviken ar wech-mañ ne oufemp o zremen !
Amañ e rankomp chom da vervel gant anken.
Aotrou Doue an Tad, a zo mat dreist natur,
Roit d'in gras d'en em denn, mar deo ho plijadur,
Demeus ar mor bras-mañ, prest da vezan beuzet.
Ma n'em be ho sikour, ennañ ez oun manet !
Taolet oun, er c'hiz-mañ, e kreiz ar ganol bras !
Gwenole, ma n'iz mat, assistañs dre ho kras !
Pedit Doue 'vidoun, evit m'en em dennin
Demeus ar mor glas mañ, rak emañ o veuzin !*

Gwenole a zeuas en-dro war e giz, mall warnañ. Digouezout a reas d'ezañ gwelout e kreiz an deñvalijenn ar jao gwenn anavezet ken mat-all, loen ar roue heñvel e liou ouz klipenn an tonnou. Eur marc'h-red e oa, brudet dreist ar re-all. Met kaer en devoa ar roue koz brouda garo e loen kaez gant e gentrou, he-mañ, o krena, o c'houesa gant ar spont, ne gerze tamm ebet war-raok. Ar mor oc'h eonenna a c'hou-

neze warnañ, a strinke ouz e zivesker, e c'hlebe re-bar d'eur pesk. Dilammal a reas Gwenole d'e skoazella. Ha dirak daoulagad ar Sant e paras e kreiz an noz, a-dreñv kein ar roue, diswel eur furm wenn. Hini eur vaouez yaouank e oa, diaes d'ezi chom azezet war dailher ar marc'h, hag he diou vrec'h ganti en dro da gerc'henn ar priñs koz. Ahez !... Gant eun faol-lagad ec'h anavezaz priñsez douellus ar banvez. Bremañ, avad, e oa hi o krena gant an aon, he bleo melen dispaket en avel. Aet e oa larkoc'h ar mor abenn neuze eget jao ar roue, en eur skei ouz e vorzedou, hag en eur c'holei ar stleugou. Re-bar d'eur strolad bleizi o chaseal, e wenne gwasoc'h an tonnou a-zehou hag a-gleiz, hag ivez diouz tu an douar, evel m'o divije bet c'hoant da stanka an hent. Dizale e teuje kelc'h an tonnou glas d'en em serrl, da ziskara ar marc'h ha d'e daga. Hag ar re a oa warnañ a vije skrapet gant ar mor sklas, ken marlonk hag eur vlei-zez, gant ar mor lonker tud beo.

Gralon, e kreiz an noz, n'en devoa ket gwelet Gwenole o tiredek war e vare'h du. A greiz-holl, e klevas, hervez Ar Richou, eur vouez spouronus o lavarout :

Taol an diaoul-se er mor, pe ez out koñkeret !

Hep klask gouzout hiroc'h, e reas Gralon eun esa da stlepel dioutañ an hini a oa peg ennañ. O veza na ziskroge ket houmañ, e tifoupas skeud eun den war vare'h eus an deñvalijenn, eur vaz savet gantañ war-du an nec'h. Gwenole e oa : gant e vaz-abad e skoas, hag e reas da Ahez gaer ruduilhat garo e-barz ar mor.

Ar marc'h, skañvaet e samm en eun taol-krenn, a reas eun nebeut lammou, hogen kerkenet ec'h asoupas. Gralon a ruilhas er mor : « Aiaou ! Setu me kouezet war va genou ! » emezañ en eur glemm.

Gwenole, avat, a c'hourc'hemenne groñs d'an tonnou, a lavar d'eomp Ar Richou c'hoaz :

*Mor, n'a ket da belloc'h nemet bet 'ar roc'h-mañ,
En an 'an Tad, ar Mab, ivez ar Spered Glan !
Sav, Gralon ! Deus er-maez, ha kemer kouraj vat.
Sav, Gralon ! 'n an 'Doue ! Digor da zaoulagad.
Ar mor, siouaz, az dall hag ar brall : sav Gralon !
Sav ganin, roue paour, ha kuita ar mor don.
Sent ouzin gant fiziañs e gwir roue an tron.
Ro d'in da zourn fornis, ha sav ganin, Gralon !
Tost out bet, ar wech-mañ, sur da vezan beuzet.
Re-zivezat az poa, Gralon, ma invoket,
Met, dre ar gwir Doue, te a zo rekouret.*

Kerkent e tistroas ar mor. Gounit a reas tachenn pelloc'h etrezek Santez-Anna-ar-Palud, Trezmalaouen hag ar Ri, hag e laoskas ar garrek-se a zo bet diskouezet e-pad pell-amzer e Pentraez, e-lec'h ma teue abaded Landevenneg, kantvedou diwezatoc'h, da ber-c'henna o gwiriou, evel m'o divije bet c'hoant da gaout ar veli-se a-berz Gralon, roue Galloudus Kêr-Iz veuzet.

*
* *

Gwenole a savas ar c'hoziad, hag her c'hasas betek ar garrek, hag eno ec'h en em striñkas war e zaoulin da bedi. Gant eur galon izel e c'houlennas skoazell digant ar Werc'hez.

« Gwelout a reomp ar reuz a zo kouezet warnomp », emezañ en e bedenn virvidik. « E kreiz he brasa sked, he fompadou hag holl lorc'h al levenez a oa o ren e kêr, ez eo aet Iz, euzus ha reuzeudik, war-du eur maro kalet. Gounezet eo bet en he fez gant ar mor bras o tont a-veuz warni : eur spont eo kement-se evit tud ar bed-mañ.

« *Gouden stat han ourgoyll a ioae ouz ren en Ys,
Aet eu garou dan marou myc, peur euzyc a dyquys;
Gant mor meur conqueret, effreyzet an bedys.*

« Itron Skedus, roit sklerijenn, d'eomp Bretoned, war hor stad. Bezit hor skoazell a-eneb galloud an Aerouant ha mirit

« *na coezhemp en nep lech dydan bech a pechet.*

Hon difennit ouz an enebour fallakr, direizet ken gwas-all.

« Diwar vremañ a dra-sur, Mari, rouanez Santel, gwerc'hez leun a c'hened, impalaerez gaer, ho pe-dimp alies da veza hon alvokadez evit hor mad.

« *Mam ha merch ha guerches, guyr Roanes an eff,
feunteun so leun a grace,*

digaset evit hon diboania, pedi a ran ar Spered a zo anvet Santel da virout da viken, dre vadelez evidomp, ouz hon ene da veza touellet.

« A-eneb kement saouzan, bezit ganeomp en hor c'hichen, alvokadez dispar. Ennoc'h emañ hon esper, impalaerez dre wir, hor priñsez holl-c'halloudek ; roit d'eomp ho kwarez !

« Tre en tu-all d'ar stered ez oc'h bet digemeret eun devez : a-us d'an aelez, eun devez, ez oc'h bet tronet gant Roue an deiz. Noz ha deiz, her gouzout a raer, c'houi, hor mamm a levenez, eo an eienenn a laouenedigez, leun-barr gant hor gwir levenez-ni.

« *Mary, gant Roe an bet, bennyguet ezedout !*

Den ebet ne vefe touellet ma lakafe e fiziañs ennoc'h. War gresk e ya bemdez va c'harantez evidoc'h : Allas ! Itron, hon diwallit diouz arvar hag hirvoud !

« *Steren, rosen an bet, clevet ouz hon peden !*

Ma spy ha ma aquet so bepret ham creden.

Enoch yve leal peur ingal eval hen :

Ma amour ouz sourcey huy a duy don dyffen ».

Evel-se, hervez gwerz koz ar Grenn-Amzer, e pede

Gwenole gant eur galon izel, ouz troad Menez-C'homh, goude beza bet saveteet eus Kêr-Iz. Ha war ar meneziad-lann e tiskennas ar Werc'hez, oc'h en em ziskouez d'ezañ e kreiz an arne-noz. Digas a reas d'ezañ da soñj ar pezh en devoa gouzañvet he mab war Venez-Kalvar, ar pezh he devoa gouzañvet hec'h-unan ouz e welout o tiwaska poan, hag e c'hrataas rei da Wenole skoazell ha gwarez.

*
* *

Kennerzet e voe Gwenole, ha distrei a reas davet ar roue koz a oa diskaret gant bec'h e c'hlac'har. Kollet en devoa hemañ e gêr, argaset e verc'h ; o-diou e oant bet lonket gant ar mor. War e zremm krizet e rede an daelou. Gwenole a lakaas an dourn d'ezañ war e skoaz.

« Saveteet em eus listri sakr da iliz kasaet gant an dud », emezañ ; « amañ emañ o vont da lavarout an oferenn evit Iz, ar gêr reuzeudik : te eo he responto ».

Kregi a reas gant e oferenn e kreiz an noz, eun oferenn ha n'eus bet biskoaz nikun-all ebet par d'ez : eur garrek rust lakaet d'ober aoter, eun nebeut stered rouez ha rous o terc'hel lec'h ar goulou binniget, eur Sant oc'h oferenna, eur roue koz sammet gant an oad ha brudet-dreist oc'h ober marchigod, hag, e-lec'h eun ilizad-tud o pedi, eur mor dirollet ha na selaoue ket. Met a-greiz m'edo Gwenole gant ar gorreou, ha pa oa o kensakra ar gwin, e paras al loar e kreiz ar c'houmoul. Ankouaat a reas ar roue ar pezh edo oc'h ober. Sevel a reas diwar benn e zaoulin, hag e pignas war lein ar garrek da welout hag hen e chome eun dra bennak eus e gêr dismantret. Gwenole a daolas evez en dra-ze, hag o veza na c'helle ket kenderc'hel e-unan gant e oferenn, e yeas d'e gavout.

Trouz ha safar a oa bepred e-barz an oabl ; ne dremene sklerijenn al loar nemet mouch-divouch ha buan-tre dre an toullou a oa er c'hoabr roget ha dispennet. Rijennet e oa c'hoaz an neñv en diabell gant al luc'hed ; atao e kroze ar gurun er pellder. Pa bare al loar, ec'h en em ziskoueze c'hoaz war ar mor furmou teñval touriou an tiez kaera : ar re a chome eus Kêr-Iz. Kent e talvez e an touriou-se da sellout ouz ar mor hag ar porz, dreist mogeriou kêr. Met en noz-se, edo ar mor o skei outo. Koeñvi a rae c'hoaz, kounnaret hag oc'h eonenna, war vogeriou kêr, ha dreisto e tremene en eur grozal. Gralon, eus a bell, a gonte an tarziou. Gouzout a ouie e vije, bep gwech, an navet hini ar gwas. Bep gwech, evit gwir, e veze an navet tarz eur mell hini. Sevel a rae hag en em wea, o tispaka e voue gwenn en avel, hag e koueze a-stok e holl bouez war an traou a chome c'hoaz en o sav. Hini ha hini e oa pilet an touriou. A-dreuz ar gorventenn e teue betek Gralon skrijadennou an dud en argoll o devoa klasket repu enno. Dizale ne chomas uheloc'h eget an dour nemet eur pezh ti kaer hag eun tour, palez ha tour ar roue. Eur sklerijenn demruz a zeue diouto, dre doullou ar prenestrou : an hini a daole ar goulou a oa e kantolorou bras sal ar fest-noz. Met eur wagenn a savas, bras meurbed, kalz brasoc'h ha kalz gwasoc'h eget ar re-all araozi, o c'holei kement tra, o laza kement goulou, o tiskara an holl draou ; hag hounez a dremenas. Ha pa voe aet e-biou, en eur redek betek an aod gant al lañs a oa ganti, ne chome mui netra diwar neuze da herzel ouz ar mor. Gouledet e oa Iz, ha war izela e tiskenne dindan poulloutro an doureier.

Ha Gwenole, mantret e galon, a vouskomzas evel hen :

« *Chanchet eou quys da Ys, ha gardys punysset.* »

*Nen deus ty, na castell, na tourell rebellet :
Enhy, bras na bihan, unan nen deus manet...*

An mor so dygoret, dyredet do metlou...

*Nac Itron nac Autrou, goude ho stadou bras,
Dre an poes o pechedou queffret o goeledas.
Goeledas ty ha men gant mor plen bet an Ras,
Enhy bras na byhan, an dro man, ne manas. »*

Kerkent e tavas ar gwall-amzer. Ar c'houlmoul a yeas diwar wel, ne chomas netra nemet al loar e-barz an oabl. Kroget e oa ar mor da zichala. War ar garrek, Gralon, kollet pep fiziañs gantañ. a laoske e zaelou da redek e-touez e varo gwenn. A-benn ar fin, en devoe Gwenole truez ouz e stad reuzeudik.

« Doue en e Vadelez a vo trugarezus, marteze, e-keñver Kêr-Iz », emezañ. « En em erbedomp outañ, o Roue ! Chomet eo va oferenn da beurlavarout adalek ar gomunion ha pa oa bet kensakret ar gwin. N'eo ket goullou-tre ar c'halir. Eur berad eus ar gwad-se a Zoue hag en deus saveteet ar bed, a c'hello marteze dasprena Kêr-Iz ».

Mont a reas da gerc'hat ar c'halir hag, o tostaat ouz ar ribl, e savas al lestr sakr evit e stlepel er mor : diskoaz noaz eur vaouez, eur vrec'h savet ganti d'an nec'h, a ziflukas er-maez eus an dour. Ha neuze ec'h anavezias Gralon ha Gwenole, gant spont, Ahez, deuet hiviziken da veza ar Vorverc'h, a zo bet lesanvet abaoe Mari Vorgan gant tud hor bro. Gwenole a grenas e zourn. Falvezout a reas d'ezañ stlepel ar c'halir etrezek enni ; met eur fourrad-avel feuls o sevel a-daol, a ziframmas digantañ al lestr prizius a oa gwer-strink Bizañs an danvez anezañ, hag e vrevas ouz ar garrek o skuilha gwad Doue a-raok ma tizas ar mor.

Ne oa ket Iz da veza saveteet, ha bremañ edo kousket e deon an islonkou.

*
* *

— « Iz, koulskoude », eme Wenole en eur ziskenn diwar ar garrek gant ar roue koz o ouela, « Iz ne c'hell ket mervel evel-se. Iz ne varvo ket c'hoaz. Diskenn he deus graet dindan an dour en deus diskaret he brasder ken lore'hus, her gwelet ac'h eus ; met dindan an dour-se e chomo beo, re-bar d'ar pezh edo kent pa oas ouz he ren. Hec'h eur e c'hortozo, da vihana. Ret e vo d'ezhi en em ziskouez en-dro, evit ober pinijenn ; met daou dra a-raok a ranko beza kaset da benn evit-se : lakaat gwad ar C'hrist, kensakret e-barz eur c'halir, da vont betek enni, ha peurechui va oferenn.

— « Bez 'e vo ! » eme C'hralon goz gant eur vouez nerzus. « Lakaet eo bet Kaourintin ganin da eskob e Kemper, roet em eus d'ezañ va c'hastell ha va galloud. Ober a ray va mennad, emichañs. Outañ e c'houlennin lakaat ober ar pezh a zo ret evit ma vo peurlavaret da oferenn, keit ha ma 'z in da veva en distro ganit da Landevenneg, evit echui eno, e-ser pedi ha leñva, an deveziou reuzeudik a chom c'hoaz ganin da dremen er bed-mañ ».

Hag e reas hervez m'en devoa lavaret. Du-ze e varvas, tost da ribl ar Ster Aon. Ha, betek mare an Dispac'h, nep piou bennak a zo bet aet di en deus gallet gwelout, e-barz iliz ar manac'hti, e vaen-bez, warnañ kizellet e latin eur skrid hag a roe da c'houzout e ano, e vrud hag e zoujañs e-keñver Doue ; met deuet eo bet an amzeriou trubuilhus d'ober o reuz ; distruj a zo bet graet. Hag eno, e-lec'h m'edo ar mestr didruez a rene gwechall war Vro-Gerne, roue divenn ha lezober Kêr-Iz, tad glac'haret Ahez, oc'h ober e gousk diweza, ne weler bremañ nemet eun toull doñjerus ha leun a linad. Met a-raok mervel en devoa kaset Gralon kemenn da Gaourintin.

Hemañ, tost d'ar c'hastell a oa bet roet d'ezañ gant roue Kemper, en devoa lakaet sevel eun iliz-veur. Meur a wech eo bet pilet ha savet a-nevez abaoe, bep gwech brasoc'h, bep gwech kaeroc'h ; met bep bloaz da c'houde, a-hed kantvedou, morse n'ez eur bet cho-met, hervez goulenn Gralon, hep adober al lidou en devoa graet Gwenole e Pentraez, hag a oa bet ken-dalc'het ganto war lerc'h gant Kaourintin.

Bep bloaz, e-doug kantvedou, da geñver reverzi vras miz meur, *reverzi Sant Wenole*, eun oferenn a veze lavaret, a ratoz-kaer ha war an ton bras, e-barz iliz-veur Gemper, evit silvidigez Kêr-Iz.

An eskob, hag a oa, ouspenn, aotrou pe gont Bro-Gerne, eo a oferenne e-unan.

Pa veze deuet ar pred da gomunia, ne eve ket piz ar gwin kensakret. Leuskel a rae eur banne anezañ e-barz ar c'halir, hag e paoueze gant e oferenn. Eur brosesion a veze graet, diskenn a rae dre greiz an iliz, hag e save gant diri an tour, an eskob o tont war he lerc'h, mintret e benn, gwisket gant eur gamz wenn, eur stol en e gerc'henn, hag o tougen gant evez bras ar c'halir gwer-strink.

War al leurgêr e oa bodet eun engroez bras a dud diredet eus pell ; e penn ar ruiou, kezek dipret, friant an tamm anezo ha prest da skara kuit, a oa dalc'het dre ar brid. Eur c'han a zeue a-ziabarz an tour, evel eur vouldinell o kreski hag o kreñvaat bep eun tam-mig. Ha dizale, goude, e tiskoache ar ganerien hag ar veleien war ar garidell, o kana a vouez uhel e kreiz avel an nevez-amzer ; hag e c'helled, neuze, klevout anat komzou ar bedenn latin, hir ha truezus, renket eun distera evit Kêr-Iz :

*Parce Domine... parce populo... tuo...
Ne in aeternum... irascaris illis.*

War an dachenn, en dro d'an iliz, an engroez, daou-

linet, a groge ivez gant ar c'han. Met dizale e tave kement trouz. An hini a zalc'he lec'h Sant Kaourintin, an eskob e-unan, a dostae ouz skeudenn ar roue Gralon a zo etre an daou dour. Du-ze, en nec'h, gwisket gant e gamz wenn, e stol aour hag e vintre aour, o ske-di e-unan gant an aour a oa en dro d'ezañ, e save a-us d'e benn, gant e zaou zourn, ar c'halir gwer-strink e-lec'h ma pare ivez eur bann-heol liou d'an aour. Edo o vont da seveni urz Gralon. Eur wech c'hoaz ouspenn, edo o vont d'ober ar pezh en devoa graet Gwenole araozañ. Daoust hag en aner e vefe adarre ? E kreiz ar vrasa sioulder e taskrene mouez an eskob santel o lavarout, war don eur bedenn, teir gwech dioustu hag ar c'hreñva ma c'helle :

« Piou a yelo da gas gwad binniget hor Salver da Gêr-Iz ? »

An holl en o sav, kerkent, hag o diouvrec'h astennet ganto, a zilamme, ken feuls ha tra war-du tal an iliz. Er penn kenta edo perc'henned ar c'hezec, ar baotred yaouank prest da vont a-ramp war o diprou. Hag holl e respontent en eur vouez, evel ma vijent bet o lavarout *amen* :

« Ni holl kement hag emamp amañ ! »

Gant evez, neuze, e stlape an eskob pell dirazañ ar c'halir troad-pounner, hag al lestr a ziskenne war-eeun etrezek an douar, an tiz a oa gantañ o kreski endra ma yae d'an traon. Met atao hag atao, e kreñvae an avel en eun taol, barrad-amzer fall reverzi miz meur a zirolle d'ar pred-se. Re-bar d'ar pezh a c'hoarvezas gwech-all e Pentraez, eur gorventenn ganas o sevel a groge er c'halir gwer-strink, hag e vruzune ouz tal mein-ben an iliz.

Ha, keit-se, d'ar Gwener ar Groaz-se, diouz an abar-daez, lano reverzi Sant Wenole a zo kaset hep gouzout d'ezañ, gant ar barr-amzer dirollet a zo bet test eus lidou eskob Kemper, da furchal an aodou, penn

da benn Mor Douarnenez. Raket ha gwalc'het e vint gantañ, ha skarzet-holl an traez diouto. Gwelet e vo diazevou mogeriou kouezet en o foull oc'h en em ziskouez, ruiadou a-bez. Digor e vo ar ruiou-se d'an hini emañ Iz o c'hortoz. A ! ma karfe hemañ dont, o vrouda gant e gentrou e varc'h gwenn gant an eon, ec'h en em dennfe pelloc'h c'hoaz ar mor dirazañ ! Her c'has a rafe, en eur hiboudi, betek an iliz-veur goueledet e-lec'h m'emañ atao ar beleg o c'hortoz, e gein harpet gantañ ouz an aoter. Met ret e vefe, ivez, e teufe gant ar marc'heger gwad Hor Salver e-barz ar c'halir gwer-strink. Rak-se ne zeuy ket, ne c'hello ket dont. Warc'hoaz, neuze, war-dro tarz an deiz, e vo deuet ar mor en-dro, o tigas gantañ an traez war an dismantrou, hag ar c'herrek e-barz ar ruiou ; rak ar wechad-mañ c'hoaz n'emañ ket Kêr-Iz da veza save-teet. Ha dounoc'hik eo diskennet adarre e-barz an traez a zo e strad he bez.

*
* *

Tremen o deus graet ar c'hantvedou : ankouaet eo bet urz Gralon hag, a hend-all, eskob Kemper n'eo mui aotrou Bro-Gerne. War nebeuta, bep eun tam-mig, eo bet heuliet ar c'hiz estlammus, ha kollet-tre eo bet da c'houde. N'eus fiziañs ebet hiviziken e yafe morse unan-bennak da Gêr-Iz da gas ar gwinn kensakret troet e gwad Doue. Met daoust hag echuet e vo, n'eo ket, avad, an oferenn a oa chomet gant Gwenole da beurechui, da vihana an hini na c'hellas ket beza lavaret e Kêr-Iz gant ar beleg dianvez, peogwir ne oa den ebet d'he respont ?

Emañ Kêr-Iz bepred o c'hortoz kement-se. Hag o klask an hini a vo gouest da gas eur seurt tra da benn, e vez Ahez o kildrei bepred hag hep chan dre an doureier, o lakaat an amzer fall da zirolla, hag o paka peg er re a vez o vont da veuzi.

Ahez, hep mar, a zo milliget. Gadal eo atao, moarvad. Hep mar, ivez, eo gwasket he c'halon gant eun anken vras ha direiz, rak bep gwech ma krog en eur gwaz ne gav da starda etre he diouvrec'h nemet eur c'horf-marzo. Met gouzout a oar ivez ne gavo he c'has-tiz eun termen nemet pa vo bet lavaret oferenn Gêr-Iz. Hag atao emañ-hi war glask.

Gwelet e vez a-wechou e-barz Mor Douarnenez pe belloc'h diouz tu an inizi, dreist-holl en takad-se eus ar mor hag a zo anvet *Kanol Iz*. Gwech a vez e tigouez d'ezhi difoupa a-greiz-holl eus poull-tro eur gasenn, eur vervenn iskis o redek war he lerc'h, rak argaset eo gant holl besked ha loened-all ar mor o deus kasoni outi ; gouzout a ouzont eo milliget. Ar pesketaer en em gav ganti, n'en deus nemet amzer da gaout dirak e zaoulagad an diswel eus he dremm vistr, heñvel ouz hini eur vaouez yaouank, eus he fennad bleo melen kribet brao o tiskenn betek hanter he c'hein gwenn-kann, hag eus he bruched ken gwenn-all. Neui a ra lijer-tre gant he diouvrec'h gwenn, he daouarn vunut, hag ivez gant he lost korvigellet, nerzus, gwevn, moan ha hir, evel hini eur silienn-vor. Meur a hini ouz he gwelout a vez touellet gant diaoul ar madou, hag a daol prim eur roued, eun treant pe enn higenn e-barz ar mor, gant ar soñj d'he faka. Pebez taol-ruz a rafe neb a zeufe a-benn da baka peg enni ! E Pariz, eme ar c'honterezed-rimadellou, ez eus eul liorz e-lec'h ma vez diskouezet d'an dud unan a bep seurt eus al loened a zo o veva e-barz ar bed : met morverc'h ebet, avad, ne gaver eno, hervez ar pez a leveront. Pegement, eta, ne rofe ket tud ar gêr-se. evit kaout ar Vorverc'h, dreist-holl an hini a oa o ren en Iz, ar gêr a oa par da Bariz ! Met an den reuzeudik hag en deus huñvreet traou ken diot, a vefe gwelloc'h d'ezañ ober e soñj da dec'hout kuit. D'an ampoent ma wel furm Ahez o pellaat hag o steuzia, a

vez re-hijet e vag gant nerz an avel evit kaout chañs a-walc'h da gas e daol da benn : p'en em ziskouez. Ahez, e vez eur barrad-amzer spontus o tostaat.

*
*
*

Eur wechad, koulskoude, eur paotrig, Goneri Porzmoger, mous ar vag anvet *Steredenn ar Mor*, he gwelas e kreiz an deiz, war-dro hanter-cost. Sioul ha sen e oa ar mor, evel eul lennad eoul. Tomm skaot e oa ivez, re-bar d'eur mell tachennad houarn glas teuzet, o luc'ha dindan an heol bero. Ne oa ket an distera banne avel, na kas ebet, koulz lavarout, gant an dour ; chom a rae ar vag hep finval tamm. Gwaz ebet er bourz nemet mestr ar vag, tad Goneri, moredet e kichen ar vaol.

Ar mous, o kempenn eun tamm koad gant e goñtell, a oa krog oc'h aoza eur c'hoariell bennak. Bep an amzer e rae eur sell ouz ar mor. Ne oa netra warnañ nemet, du-mañ du-hont, pell bras, eun nebeut bagou ha na finvent ket tamm ebet, int kennebeut.

A greiz-holl, war bouez nebeut ac'hane, e teuas eun dra bennak da freuza melezeour an dour glas. Hantergorf eur plac'h, noaz he c'hein ! Hija a reas he fenn en adrenv. Eur pennad bleo melen en em zispakas, hag ar plac'h en em lakaas d'e floura gant he daouarn hir ha munut. Gwenn-kann e oa he chouk, ha kaersouezus he diouскоаз. Troet e oa he c'hein ganti d'ar vag. Sebezet e voe ar c'hrennard pa daolas evez e stankae a-nebeudou, adalek he dargreiz, ar skant war ar penn an traon eus he c'horf, demc'hlas al liou anezañ, ha re-bar dindan an dour da gorf eur pesk, pe da hini eun naer-vor. En em rolla a reas al lost hir ha brenkek a-iz d'ar vaouez, evel m'he divije bet houmañ c'hoant da gaout eun harp dindani. Hep selout en dro d'ezi, e kase bremañ plac'h ar mor he daouarn d'he dremm, hag e ouele. O ouela da betra

edo hi, evel-se, an deiz-se, e kreiz ar mor ken sioul, ken skedus-all, ha dizarempred neuze, moarvad hervez he soñj ? D'he fec'hedou, pe marteze, d'he gwall blanedenn ?

Goustadik ec'h en em ruzas ar paotrig betek e dad. Moredet e oa hemañ atao, ar vaol gantañ dindan e vrec'h. Gant e zourn e stokas outañ hag an den a reas eul lamm. « Tad », a lavare ar mous, « Sell 'ta !

— « Ahez ! » eme ar gwaz o tilammat en e sav en eur sakreal. — « Laosk an eor da vont ! » a hopas heñ d'e vab.

Ouz e glevout o komz, he devoa plac'h ar mor he diouскоаз gwenn distroet he fenn, ha plomet, kerkent, dindan an dour. Eul lamm a reas ar c'hrennard betek an eor, d'e deurel herr e-barz ar mor. Ar fun a ziskennas gant tiz eus ar vag ha, dizale, e chomas plom en-istribilh : n'en devoa kavet an eor krog ebet. « Stag eur pennad kordenn-all ouz ar fun ! » eme an tad. « Stag an holl gerdin outi ! » Skoulma a reas ar mab hag an tad penn-oc'h-penn kement korden a gavjont. A-benn ar fin e pegas an eor.

Bremañ, moarvad, edo pell ar vorverc'h diouto. Anat e voe kement-se d'an tad pa voe divorfilet gwelloc'h, ha falvezout a reas d'ezañ sevel an eor. Met ne voe ket gouest d'e lakaat da ziskregi. Ne oa eno, koulskoude, dindan ar mor, karreg ebet hag a vije bet anavezet gant ar besketerien. Edo ar martolod o klask gouzout perak e oa kroget ennañ ar c'hoant da eoria e vag, e-lec'h m'edo ken doun-all ar strad. « Eur peñse a rank beza aze ! » emezañ d'ezañ e-unan. Ne c'hellas ket ober ar soñj da leuskel war e lerc'h an eor, ar funiou, ar c'herdin, ar rabankou, ha kement tra en devoa staget penn-oc'h-penn. Hag heñ da ziwiska e votou.

« Mont a ran d'ar strad da welout ouz petra eo chomet krapet, » emezañ d'e vab ; « Sach war ar fun pa rin eun hij d'ezi ».

Hag a-raok m'en devoe amzer ar paotr da lavarout grik ebet, e oa rampet ar pesketaer dreist kantenn ar vag, hag e tiskenne penn da benn gant ar c'herdin, staget an eil ouz penn eben. Re-bar d'an eor, a oa aet ken buan-all etrezek ar goueled o kinnig brevi e fard, e tiskennas ivez ar martolod kalz founnusoc'h eget a soñje. Gant e zaouarn leun a galedennou hag e dreid ken rust ha karn, e klaskas enebi evit mont goustadikoc'h ; met, daoust da ze, e riske hag e riske atao, primoc'h-prima, palvou e zaouarn o leski, da c'hortoz beza kignet moarvad. Met dizale, e stokas e dreid ouz eun dra bennak o tenna d'an houarn. Eur groaz e oa, evel ar re a vez lakaet war an ilizou : houmañ, avad, a oa alaouret. Sanket e oa war lein eun tour uhel, disheñvel diouz ar re a weler e Breiz abaoe pell 'zo. Penn da benn tu-diavaez ar volz, e oa krapou arem merglet, oc'h ober pazinier evel bizier eur skeul. En eur vont eus an eil d'egile, e tiskennas ganto Porzmoger goz. En em gavout a reas e kichen eun toull hep dor, hag e welas kleier dindan bolz an tour. Etrezek enno e yeas, peg a bakas e korden an hini brasa anezo, hag ec'h en em laoskas da riska izeloc'h penn da benn ganti. Ha setu m'en em lakaas da vralla ha da son, n'eo ket hepken ar c'hloc'h edo heñ en-istribilh outañ, met an holl gleier a oa en tour. A-us da benn Porzmoger, dizale, e voe hole bras enno, daoust da nerz o mouez da veza torret eun distera gant pouez ar morad dour a oa en dro d'ezo. En eun taol-berr, ec'h en em gavas Porzmoger e-barz eun iliz sklerijennet ha leun a dud. E dreid a gavas harp war intol flour al leurenn, etre pevar filer an tour, dirak an aoter vras. An iliz he devoa furm eur groaz verr ; diouvrec'h ar groaz-se a oa leun a dud, hag ouz an aoter edo eur beleg o c'hortoz. Diouz tu an aviel e oa eur bank-enor hag a oa goullou ; hep gouzout mat a-walc'h petra a rae, e yeas Porzmoger da azeza war-

nañ. Ne ehane ket an dud da zont e-barz an iliz, ha stankaat a raent atao enni. Aotrouned, gwisket gant mantilli ruz ha na weler mui ar c'hiz anezo e nep lec'h, a zeue gant hast da gemerout o lec'h er penn uhela. Tostaat a reas eus vaouez yaouank bleo melen, kaer-meurbed, hag a yeas da azeza war eur bank-enor all, eeun dirak Porzmoger. Eur brinsez, moarvat. Hag he daoulagad bras liou ar mor a chome diehan da bara warnañ, hep finval.

Eur c'hloc'her a oa krog gant e gest. « Evit an Anaon ! » emezañ oc'h en em sila e-touez an dud, « evit an Anaon kaez ! » Kement hini eus ar re a oa eno a roe d'ezañ eun dra bennak. Pep hini a daole eur pezmoneiz e-barz e blad arc'hant ha, koulskoude, ne glevet trouz ebet o tont dioutañ. Gant eun neuz lar-gentezus, e stlape an dudjentil mantellet-ruz hep a bez aour pounner hag a lamme er plad, met netra ne sone. Goulenn a-walc'h a rae atao ar c'hloc'her profou « *evit an Anaon kaez,* » met ne zeue grik ebet gantañ da drugarekaat. Ne lavare ket, evel ma 'z eo ar c'hiz, ar c'homzou ken leun a fiziañs a glever gant ar gesterien : « Doue ho paeo ! » Dont a reas dirak Porzmoger, hag e lakaas ar peziou arc'hant hag aour da lammad didrouz e-barz ar plad. « Evit an Anaon ! » emezañ gant eur vouez pounner, hep distaga e sellou diwarnañ. Porzmoger, ivez, a selle outañ, hag a selle ouz ar peziou, beb eil tro. Bez 'e oa ar re-mañ traou dopes ha linennet gros, ha moulet fall ar merkou a oa warno. Peziou a bep ment hag a bep doare e oant, darn anezo tano ha plat, darn-all bolzet o c'hreiz ; al lodenn vrasa, koulskoude, a oa merket muioc'h diouz eun tu e-rez ar gantenn. Evel eur peul e chome ar c'hloc'her dirak Porzmoger, e zaoulagad o para warnañ bepred. Hija a rae atao, hep ober an distera trouz, e beziou iskis ha sioul, hag e c'houlenne adarre, birvidikoc'h eget diagent : « Evit an Anaon kaez ! » Ne

ouie ket Porzmoger petra da soñjal, ha, bep eil tro atao, e selle ouz ar plad hag ouz ar c'hester. Ne zeuas gwech ebet en e benn ar soñj da gas e zourn d'e c'hodell evit ober evel ar re-all. Daoust hag eur gwenneg hepken en divije kavet enni, ar paour kaez pesketaer ? Ha moneiz a vez gant an dud, pa yeont da besketa ? « Hag evit prena petra, ivez 'ta ? » en divije heñ respontet da nep a vije bet o klask gouzout an dra-se. Pa zeuer diwar ar mor gant pesked eo, e vez kavet moneiz e kêr ; hag e kêr, ivez, eo, o dispigner buanoc'h eget na vezont gounezet. Petra a dalv, avad, d'eun den kaout war vor traou-all en e c'hodell nemet eur goñtell ? Penaos 'ta ne ouie ket an dra-ze an hini a oa oc'h ober ar gest, e iliz ar gêr iskis-se goloet gant ar mor ?

A greiz-holl, setu ma finvas ar beleg. Ehana a reas e sellou morc'hedus da bara war an ilizad-tud a oa dirazañ, hag e troas e zaoulagad war-du Porzmoger. E-pad eur pennad mat e chomas da sellout trist ha parfet outañ, hag, evel ma vije bet o klask e lakaat da deurel evez ennañ, e krogas da gana goustadik :

« *Dominus vobiscum !* »

Porzmoger a redas eur grenienn penn da benn e gorf, hag e chomas alvaonet. Sellout a reas ouz an engroez, ouz ar briñsez : an holl a oa troet o daoulagad ganto etrezek ennañ. Taer hag enkrezet e oa sellou ar briñsez, ha diaes-bras gouzout petra a c'hoantaent rei da anaout. Sellout a reas Porzmoger ouz ar beleg, ha ne rannas ger.

« *Dominus vobiscum !* » eme ar beleg adarre gant eur vouez deuet da veza c'houerooc'h. War drista ha war nec'heta e oa aet ivez e sellou. Ne zistage ket e zaoulagad truezus hag evel oc'h aspedi diouz re Borzmoger. Hag ar briñsez, an dudjentil, ar voure'hizien, ha kement den a oa en iliz, en em starde hag a save

war veg o zreid, da sellout gant c'hoant ouz ar pesketaer, an enkrez a oa enno o kreski bepred. Sabatuet-krenn e voe Porzmoger, hag e chomas c'hoaz dilavar.

« *Dominus vobiscum !* » eme ar beleg evit an deirvet gwech, gant eur vouez skiltrus, poaniet ha garo, o tregerni e kreiz sioulder euzus an iliz leun-tenn. Hag adarre ec'h en em gavas gant daoulagad Porzmoger sell lemm ar briñsez, sellou kounnaret an dudjentil, ha sellou an engroez, karget a anken hag a euz. Mantret e chomas, ha ne respontas ket c'hoaz ar wech-mañ, o welout e oa eur gwalleur kuz bennak o vont da c'hoarvezout.

Neuze e tiskouezas ar beleg hag ar gristenien o dizesper skrijus. Ne voe ket kendalc'het gant an oferrinn. Euzus e voe ar pez en em gavas. Gwelout a reas Porzmoger dour glas-melen ha teñval o tont a-nevez da garga an iliz. Dremmou ha korfou ar re a oa eno a freuze hag a zispennne ; dilhad kaer an dudjentil a yae tamm ha tamm da netra ; relegennou digiget a zisac'he bern-oc'h-vern an eil war c'horre eben. Furm ar briñsez hepken a chome hep beza distreset. Houmañ, ganas he doare, a oa tostaet ouz Porzmoger hag en em lakaet dirazañ. He c'horkenn gaer hag hec'h hivizou seiz, avad, a deuze en dro d'ez, ha dizale, e voe en ncaz-piteran rag-eeun d'ezan. Ha Porzmoger, trellet e zaoulagad gant ar gwel eus he brennid ken kaer ha ken gwenn, a welas ivez e oa ar penn izela eus he c'horf, adalek an dargreiz, goloet-holl gant skant glas. Aon en devoe da gompren piou a oa dirazañ, hag, a-raok ma c'hellas distaga an ano a oa en e c'henou, e lavaras plac'h ar mor d'ezañ gant eur vouez dichek hag otus :

« Perak n'ac'h eus-te ket respontet d'ar beleg ? Ha n'ouzout ket 'ta ez pije hor saveteet holl ? »

— « E pe lec'h emañ-me 'ta ? » a c'hrozmolas Porzmoger, en eur vont war e giz etrezek kerdin ar c'hleier.

— « Ha n'ouzout ket 'ta emañ e Kêr-Iz ? »

Ahez ! E gwirionez, Ahez an hini eo a oa dirazañ, kounnaret hag o c'hourdrouz ! Kregi a reas ar peske-taer e korden ar c'hloc'h bras, hag hemañ en em lakaas da verka glaz. War-bouez e ziouvec'h e pignas Porzmoger d'an nec'h ; tremen a reas e-kichen ar c'hloc'h, hag e kavas en-dro ar c'hrapou arem hag ar groaz alaouret. Eur sell a daolas izeloc'h egetañ : ne wele eno, e kreiz ar ruiou, nemet eskern tud varo ruilhet ha diruilhet gant nerz ar mor. E eor a zigrapas prim, hag eur sach herr a reas war ar fun da gas kemenn d'e vab. Hemañ a sachas war ar gorden keit ha ma krimpe e dad outi evit paka ar gorre, mall bras warnañ, o veza ma krede e oa unan-bennak o tont war e lerc'h. En em deurel a reas en e vag, hanter-vouget hag o tiflaka. « Trouc'h ! Trouc'h ar rest eus ar fun ! Trouc'h 'ta ! » emezañ d'ar paotrig, o welout ne oa ket hemañ evit dastum buan a-walc'h ar gorden-se ha n'he devoa fin ebet. Graet en devoa ar soñj da goll e eor, gant aon e vije dalc'het dre enni ; ha, neuze, e tilammas da gavout ar vaol. Gant an aezenn a oa savet, ar vag a gerzas kuit gant tiz, a redas, a lammas eus an eil gwagenn d'eben, hag a dec'has dirak ar barrad-amzer spontus a oa o tiredek eus goueled an dremwel, evel ma c'hoarvez bep gwech pa zigouez unan-bennak gant Mari Vorgan.

*
* *

Hag Iz, tevoc'h eget biskoaz an traez war he ruiou, ha ken kaer-all he dismantrou gant o c'hreoñvad bezin gell ha hir o wagenni gant kas al lano ha digas an tre, Iz, ar gêr goueledet e strad ar mor boull ha splann, n'eo ket c'hoaz saveteet.

GWERZ KER IZ

Pa 'z eo gwir n'eo ket Iz saveteet c'hoaz, e vez ar Varzed dalc'hmat oc'h huñvreal d'ezi. Re Vreiz-Izel ha re Vro-C'hall. Sevel a reont gwerziou diwar he fenn, e brezoneg pe e galleg, gwelloc'h pe zisteroc'h hag hiroc'h pe verroc'h an eil eget eben. Peurvuia ne ya ket o mouez pell en tu-all da dreuzou o zi. Met a-wechou, koulskoude, e teu an dud a ziwar-dro da vouskana, da ziskana, da vruda ha da skigna o c'hannaouennou. Piou 'ta, e Breiz, hag abaoe pegeit 'zo n'anavez ket, kalz pe nebeut, *Gwerz ar Roue Galon ha Kêr-Iz* ?

Gant piou eo bet savet ar werz-se, bremañ 'z eus kant vloaz pe war-dro ? Lavaret e vez, peurliesia, eo gant Olier Souvestr, eur skrivagner eus tolead Montroulez, ginidik, moarvat, eus parrez Plourin. Hogen, n'ouzer ket kalz a dra diwar e benn, na pedavare eo bet ganet, na pedavare e varvas. Petra eo bet deuet da veza war-lerc'h brezel ar bloavez dek-ha-triugent ? Den ne oar. Hervez lod e voe fuzuliet e Pariz da vare deveziou reuz ar Gomon Ruz, hervez lod-all e vevas c'hoaz e-pad pemzek vloaz. Ha pe oad en devoa pa savas gwerz Kêr-Iz ? Kavet eo bet houmañ, da genta, e dournskridou Alexandr Ledan, maro e Montroulez er bloaz 1855 : kosoc'h eo ar werz eta. Gwir eo e lavarer e oa ganet Olier Souvestr er bloaz 1835. N'en devoa, neuze nemet ugent vloaz pa ganas Kêr-Iz ? Yaouankoc'h e oa c'hoaz, war a greder. Selauomp Olier Souvestr e-unan, e kentskrid *Mikael*, e levrig moulet e Paris er bloaz 1862. Aes eo gwelout eo *Mikael* heñ e-unan :

« Spered ar varzoniez vrezonek eo a zeuas da genta da douella *Mikael*. Ne ouie hemañ netra diouz doareou ar galleg a-raok an oad a zaouzek vloaz. Deuet e oa da gaout, pa oa yaouank-tre, skiant ar muzul hag an distaga o klevout lenn eur pezh c'hoari savet diwar skouer ar varzoneg vrudeta a oa er vro : *Buhez ar Pevar Mab Emon*. Gwerz *Kêr Iz*, hag a savas nebeut amzer war-lerc'h maro e vamm-goz, a voe, diouz e berz, eun testeni a zoujañs en eñvor d'ar vaouez-se hag evel eur marsoñj eus ar pezh en devoa skrivet. O veza ma oa techet da heulia al lusk en devoa roet ar Gonideg a oa o klask adreiza ar brezoneg, e reas ar menoz da skriva e brezoneg yac'h hag a vije komprenet gant an dud a veve en e amzer.

« Ne oa ket aes kas ar gefredi-se da benn ; rak yez Marzin, Taliezin ha Gwenc'hlan, abaoe ma 'z eo maro ar varzed vras-se, a zo taraset gant ar galleg deuet d'en em sila enni. Ha bremañ, re-bar d'eur rouanez diskaret, eo kaset bemdez war he c'hiz etrezek ar Mor bras hag emañ-hi, reuzeudik, o vervel dindan truilhou he mantell skedus.

« A-barz tizout e bal e ranke ar c'hloareg, eta, skarza diouz e yez kement kemmeskach estren a oa enni pe, da vihana, digemerout netra nemet gerioù implijet gant an holl abaoe pell-amzer, hag a oa dao ober ganto pa oa diouer anezo. Mennout a reas, ouspenn, sevel eur steuenn e doare da lakaat danvez e labour dre daolennou, evit ma vije hemañ beo-buhezek, en eur rei d'ezañ muioc'h a sked hag a diz. Pa voe echu gantañ, e roas e bezig-barzoniez da varn d'eun den gouiziek war ar brezoneg, hag hemañ e veulas dreist e dalvoudegez.

« Ho kwerz, » emezañ « a vevo, hiviziken, keit hag ar brezoneg. »

Ya 'vat : keit hag ar brezoneg. Piou eo an den

gouiziek-se hag en deus barnet ken eeun ? An aotrou beleg Moal marteze ? Kentoc'h eo Alexandr Ledan, a adskrivas ar werz war e gaierou. Mouler e oa al Ledan, her gouzout a raer. Dizale e voe moulet ar werz gantañ war baperennou distag, ha strewet dre bevar c'horn Breiz-Izel gant kanerien goz pardonioù gwech-all. Hag an dud he c'hane d'o heul. Berraet e veze gant lod, hiraet gant lod-all, distreset eun tam-mig ha disneuziet ivez. Skriva a ra Boulain, en e *Eñvorennou a Gerne-Izel* : « Beuzidigez *Kêr-Iz*, eur werz a zo bet savet warni, hag holl hon eus bet klevet he c'hana e-barz hor foarioù hag hor pardonioù ». Ha displega a ra, e galleg, penaos :

« E eskobti Kerne, e-lec'h m'emañ hirio mor Douarnenez, e oa gwech-all eur gêr vras, Iz hec'h ano. Eur voger vras, uhel ha ledan, enni skluzioù houarn, he goarne diouz ar mor bras... »

Ma seblant d'eomp, da genta, disheñvel an danevell displeget gant Boulain diouz gwerz Olier Souvestr, e kavomp enni, a greiz-holl, e brezoneg :

*Ha Gwenole, en eur grenn,
A gri : Gralon, taol an diaoulez
Diwar dailher da inkane.*

Hag ar gerioù-mañ a zo eus pluenn Souvestr. Hogen, piou en deus hiraet ar werz evit lakaat dirazomp Gralon goz aet, gant Gwenole, da Landevenneg da echui e vuhez e-ser, ober pinijenn ha gouela d'ar gêr skedus beuzet ?

*Lavar d'in : ar beleg
Parrez Landevenneg,
A lein e di,
A wel c'hoaz o vale
Gralon ha Gwenole
En abati ?*

Kement-mañ, avat, a zo eur greskadenn.

O veza na gaver ket stank ken, bremañ, gwerz Kêr-Iz, hag o veza ivez eo bet dislivet eun tamm war *Bleuniou Breiz* ar bloaz 1889, e lakaomp amañ, da heul, ar werz vrudet, n'eo ket henvel-tre ouz hini Olier Souvestr, hogen heñvel-mil ouz an hini a veze gwerzet gwechall e pardonioù Kerne, e kreiz ar Me-neziou Du.

GWERZ ar Roue Gralon ha Kêr-Iz

War don Judit hag Holofernez
pe war hini Bosenn Eliant.

I

Petra 'zo nevez e Kêr-Iz,
Mar deo ken foll ar yaouankiz,
Mar klevan-me ar biniou,
Ar vombard hag an telennou ?

N'eus e Kêr Iz netra nevez,
An ebatou-mañ 'vez bemdez ;
N'eus e Kêr Iz nemet traou koz,
Rak ar festou-mañ 'vez bemnoz.

Bodennou drez 'zo diwanet
Ha dor an ilizou prenet ;
Ha war ar beorien o ouela
E hiser ar chas d'o drailha.

Da c'houezek vloaz an holl verc'hed
N'o deus doue 'met ar pec'hed,
Ha da ober e gurunenn
E roont o c'haera rozenn.

Ahez, merc'h ar Roue Gralon,
Tan an ifern en he c'halon,
Er penn kenta eus an diroll,
A gas d'he heul ar gêr da goll.

Sant Wenole, gant kalonad,
'Zo bet meur 'wech o kaout he zad
Ha gant daelou an den Doue
En deus lavaret d'ar Roue :

« Gralon, Gralon, laka evez
En dizurziou a ren Ahez,
Rak tremenet 'vo an amzer
Pa skuilho Doue e gounner !

« E-lec'h ma oa c'hoarzadeg kent
E vo neuze skriagnadeg-dent ;
E-lec'h ma oa kanaouennou
E vo neuze skrijadennou !... »

Hag ar roue koz, spouronet,
E verc'h en deveus kelennet ;
Met diskaret gant ar gozni,
N'eus mui a nerz da stourm outi.

Ha, skuiz gant rebechou he zad,
Evit mont diouz e zaoulagad,
He deus graet gant drouksperedou
Eur palez kaer tost d'ar skluziou.

Eno, gant hec'h amourouzien,
Emañ fenez an abadenn.
Eno, en aour hag er perlez,
Evel an heol e par Ahez...

II

— « Plijadur d'eoc'h er palez-mañ,
Merc'hed jentil ha paotred skanv,
Plijadur d'eoc'h ha nozvez gren, »
Eme eur priñs en eur antren.

Ar priñs a zouge dilhad ru,
E varo a oa hir ha du ;
E holl izili a verve
Hag e zaoulagad a zeve.

— « Ra viot deut mat, estrañjour »,
Eme Ahez gant eur beg flour ;
« Ya, ra viot deut ar gwella
Ma anvezit an traou falla. »

— « Neuze me 'm bo digemer mat »,
A respontas an divroad,
« Rak me eo 'r fall 'zo ken desket
Hag an Hini 'n deus e grouet. »

Ha kerkent Ahez d'e bedi
Da ober eun dro-zañs ganti,
Hag an holl, a-eneb Doue,
Gwasa ma c'hellent a doue.

Pa oa d'an abadenn-se fin,
Dañser Ahez, en eur c'hoarzin
Hag en eur sevel e ziouskoa,
A lavaras : « N'ouzoc'h netra ! »

« Kerc'hit d'in-me eus a Gêr-Iz
Veseilhou santel an iliz ;
Kerc'hit kroaz ar C'hrusifiet,
Eun osti sakr hag e welfet ! »

Ahez a respontas timat :
« Kavet 'vint e iliz va zad ;
Rak va zad diot c'hoaz a gred
En trompler-se a Nazared !... »

Tri a redas e berr-amzer
Hag a ziskaras an aoter,
Hag an traou sakr a voe douget
Etre o daouarn milliget.

Ar Priñs Ruz, raktal m'o gwelas,
A greiz e galon a c'hoarzas
Hag a lavaras, joa ennañ :
— « Plijadur d'eoc'h er palez-mañ ! »

Da genta, a daoliou botou,
E vruzunas ar veseilhou.
Goude 'flastras ar grusif
Hag e krañchas war an osti !...

Ha warno, gant an holl en noaz,
En eur gana : « Malloz d'ar Groaz ! »
'Reas, e seiz stumm disheñvel,
Dañsou ar Seiz Pec'hed Marvel.

Kerkent ar palez a grenas
Hag ar c'hurunou a strakas,
Hag a-dreuz o sellou nec'het
E skoas tan glas al luc'hez.

— « Na c'houi 'wel », eme ar Priñs Ru,
« Me 'laka Doue war e du... »
Hag e lavarent gant glac'har :
— « Ahez he deus kavet he far !... »

III

Pa oa fin d'ar sakrilejou,
Mesajer an drouksperedou,
Chomet e-unan er palez,
A dostaas da gaout Ahez.

— « Va dousig koant, merc'h da C'hralon,
Ha muia karet va c'halon,
Ha n'hellfen-me ket, eneb giz,
Gwelout alc'houez skluziou Kêr-Iz ? »

— « Va zad a zoug en e gerc'henn
Eun alc'houez aour diouz eur chadenn.
Va zad bremañ a zo kousket
Ha kaout an alc'houez n'hellan ket. »

Met heñ d'he zreid en em strinkas
Ha d'he dournig flour a bokas,
Hag he dallas gant e sellou,
Karget a dan hag a zaelou.

IV

Hep goût ar pez a dremene,
Neuze, eur pennad ac'hane,
En e balez ar roue koz
A oa kousket e kreiz an noz.

Kambr paour Gralon ne oa enni
Netra nemet eur grusifi
Deuet a zourn eur mignon ker,
Sant Kaourintin, eskob Kemper.

Netra nemet eun aviel
Roet c'hoaz gant eun den santel,
Roet d'ezañ gant Gwenole
Evel eur merk a garante.

Kaer en e gozni, 'vel eun él,
E kouske roue Breiz-Izel
Hag, en dro d'e dal, e vleo gwenn
A ré, dispak, eur gurunenn.

Neuze Ahez, ar briñsez fall,
Evel pa vije skoet dall,
En e gambr, hep aon rak Doue,
A zeu da laerez an alc'houe.

'N eur vale skañv war veg he zroad
E tosta ar verc'h ouz he zad
Ha goustadik, eus e gerc'henn,
E tenn, hep c'hoarzin, ar chadenn.

V

Piou 'zo 'tont du-hont gant ar ru,
Pignet war eun inkane du,

Hag heñ d'an daoulamm war e gein
Ken na strink an tan diouz ar vein ?

Hennez eo mesajer Doue,
Digaset en Iz d'ar roue ;
Hennez eo abostol ar feiz,
Sant Wenole, karet e Breiz.

Tostât a ra 'n eur c'haloupat,
En e zourn dehou e vaz-abad,
Hag eur stol aour war e sae wenn
Hag eur c'helc'h tan en dro d'e benn.

Setu heñ 'tal dor ar palez
E-lec'h 'mañ kousket tad Ahez.
Diwar e varc'h, an den santel
A c'halv, en noz, a vouez uhel.

— « Gralon ! Gralon ! sav hep dale,
Sav evit heulia Gwenole ;
Sav evit tec'hout raog ar mor :
Skluziou Kêr-Iz a zo digor !

Hag ar roue koz trubuilhet
Er-maez e wele 'zo sailhet :
— « D'in-me, d'in-me, va marc'h prima !
Siouaz, peurgollet ar gêr-ma !

Ha war e varc'h, e-berr-amzer,
E kerz da heul e vignon ker.
Ha war o lerc'h, eur eur yudal,
E klevont ar mor o ruilhal.

Neuze ar briñsez dirollet,
Hec'h amourous ganti kollet,
Dre Gêr-Iz, a-gleiz hag a zeho,
A rede, dispaket he bleo.

Met pa glev daoulamm ar c'hezek
A-raok ar mor o tiredek,

Dre al luc'hed, gant nec'hamant,
Ec'h anvez he zad hag ar Sant.

— « Va zad, va zad, ma am c'haril,
War ho marc'h skañv va c'hemerit ! »
Hag, hep respont, an tad tener,
A sav e verc'h war an tailher.

Kerkent, ar mor a vuana
Ha Gwenole, en eur grenn,
A gri : « Gralon, taol an diaoul-se
Diwar dailher da inkane !... »

Koulskoude c'hoaz, leun a enkreuz,
An tad a zalc'h ar bec'herez.
Met ar Sant a ra sin ar groaz,
A zeu hag a sko gant e vaz.

Kerkent mestrez an droukspered
A ruilh er mor bras fuloret
Hag e kev tost ar roue koz
Eur c'hoarz skiltrus e kreiz an noz.

Met rentet skañvoc'h hep dale,
E sailh prim, da heul Gwenole ;
Hag e varc'h, gleb e beder c'har,
A lamm eus ar mor en douar.

Breman aet da Vari Vorgan,
Ahez, ouz skend al loar, a gan,
A gan hag, en eur vouse'hoarzin,
A grib er mor he bleo bezin.

VI

Da sav-heol, ar Sant ha Gralon
A bigne war lein Menez-C'homm
A zo e dreid e-barz an tréz
Hag a sell ouz Douarnenez.

Ac'hane, roue Breiz-Izel
War e lerc'h a daolas eur sell ;
Met e-lec'h Iz gant he dek dor
Ne wele mui nemet ar mor.

— « Eur gêr am boa eus ar gaera
Ha setu hi aet da netra !... »
Hag e galon holl a frailhas
Hag e zaoulagad a ouelas.

— « Gralon, Gralon », 'me Wenole,
« Gralon, d'an daoulin ganin-me ! »
Ha Gralon, dindan e c'hlae'har,
Gouezas d'an daoulin d'an douar.

Hag eno, dispak e vleo gwenn
Hag e dal stouet er boultrenn,
E lavare c'hoaz ar roue :
« Ra vo graet bolontez Doue ! »...

Pa savas diwar e zaoulin,
Dindan tan flamm heol ar mintin,
E welas, a-dreuz e zaelou,
O luc'ha Maen Ruz ar Goulou

War ar maen-se, hon tadou koz
A skuilhe gwad d'eun doue faos
Hag ar roue, e berr-amzer,
A lavaras d'e vignon ker :

— « Du-hont, en eñvor a Gêr-Iz,
« Me 'savo d'ar feiz eun iliz
« Hag, evit testeni d'an holl,
« M' hec'h anvo : iliz Rumengol.

« Rak war daol-baen ruz Tentatez,
« Me 'lakay da ren ar Werc'hez
« Ha bep bloaz, en enor d'ar groaz,
« E rin ober eur pardon bras.

« Eno an holl dud aflijet
« A gavo d'o foaniou remed
« Ha silvidigez d'o ene,
« Dre c'hras Mari, gwir vamm Doue.

« Pa vo an doueou maro
« Ha kouezet meur a goad dero,
« Eun deiz, diouz ar peder avel,
« E teuio di pobl Breiz-Izel.

« Neuze, ma vez soñj eus Gralon,
« E vo lavaret a galon :
« Bras ar burzudou a zo bet
« E-barz an amzer dremenet !... »

DIBENN-SKRID. Paotred ar Brezoneg Chimik a gredo kaout peg, hep mar, e gerioù pe droioù a zo, evel *e c'hened, en em wea, ar gammed, deon, skeudenn* hag all. Mar hon eus o laosket evel-se, ez eo o veza ma vent implijet en doare-mañ gant an holl e Kerne a-bez.

Pajenn ar yez

Ar GLOUED e brezoneg hag e kembraeg

Ar brezoneg hag ar c'hembraeg a zo anezo diou yez-c'hoar, o veza ma 'z int diouanet eus an hevelep gwrizienn, ar yez a veze gand an Hen-Vrezoned en enezenn-Vreiz a-raok an disrann, hon hendadou o tont amañ da sevel Breiz-Izel, ha Kembreiz o venel er Vro c'henidik. Setu amañ eun nebeut gerioù da rei eur skouer eus ar gerentiez-se.

Brezoneg :	Kembraeg :
Ar gloued	Y glwyd
Bannou ar gloued	Bannau y glwyd
Post ar gloued	Post y glwyd
Barrennou ar gloued	Barrau y glwyd
Kliked ar gloued	Cliced (pe cliclied) y glwyd
Ahel ar gloued-tro	Echel y glwyd-tro.

E Kembre, evel ma vez ar c'hlouedou war ar parkeier uheloc'h peurvuia eget e Breiz, e vez warnezo, da aesaat gaoliata, eun tamm koad oc'h ober evit stleug, anvet « camfa » (distaget : *kamfa* ; uheloc'h distaga *w* evel *ou* ha *ch* evel *c'h*).

F. VALLEE.

Gerioù brezoneg beo nebeut anavezet gant ar Skrivagnerien

AMPUSTUILH, ano gwan. « Impotent », e galleg.
Sk. : Eun den ampustuilh. Chomet eo Yeun ampustuilh abaoe ma 'z eo bet degouezet gantañ terri e c'har (Pleiben).

BATOUILHAT, verb. Komz kalz en eur lavarout an traou a-dreuz hag a-hed.

Sk. : P'en devez amzer, e chom Yann da vatouilhata n'ouzon ket pegeit (Pleiben ha tro-war-dro).

BATOUILHER, ano gourel. Nep a zo troet da gomz kalz en eur lavarout an traou a-dreuz hag a-hed.

Sk. : N'hoc'h eus tamm fiziañs ebet da gaout en e gomzou, rak n'eo nemet eur batouilher.

KANUCHENN, ano gwregel. Kevnidenn vras (Gwezeg).

KARNA, verb. Moulbenni, mourenna, mouza, gina, hervez Vallée. « Rechigner », e galleg.

Sk. : Karna a rae en eur vont d'ober ar pezh am boa gourc'hemennet d'ezañ (Gwezeg).

KLUKA, verb. Lonka prim hep chaokat.

Sk. : Kluket em eus eur vi. N'eus ket par d'ezañ da gluka eur werennad sistr (Pleiben ha tro-war-dro).

KOUJORN, ano gwan. Krenn-deo ; « trapu », e galleg.

Sk. : Eur marc'h koujorn hoc'h eus prenet. Eur paotrig koujorn eo va mab yaouanka (Pleiben ha tro-war-dro).

KURZA, verb. Strisaat, bihanaat (Ne vez lavaret nemet eus an traou fetis).

Sk. : Kurzet eo va bragou abaoe ma 'z eo bet gwalc'het. Kurza a ra ar c'hoad glas dre ma teu da sec'ha (Pleiben ha tro-war-dro).

DELTU (n'ouzon ket pe reiz en deus).

« Eun den hag a zo deltu gantañ » a zo unan difrae da labourat ha da gas an traou en dro (Pleiben).

FARBOTA, verb. C'houilia, furchata.

Sk. : Kaer am eus farbota e goueled an armel, ne gavan ket va yalc'h. Farbotet em eus ar bern pri-se da glask ar gontell a zo bet kollet (Pleiben ha tro-war-dro).

FLABOUSA, *flabousat*, verb. Kabouilhata ; « patouiller », e galleg.

Sk. : Emañ ar verc'hig o flabousat an dour (Pleiben ha tro-war-dro).

FLANA, verb. Komz brao ouz unan-bennak pe ober brao d'ezañ evit beza deuet-mat d'an den-se, pe gwelet-mat gantañ pe, c'hoaz, evit beza digarezet goude beza graet eun droug bennak, eun dra diseven... (Tenna a ra eun tammig talvoudegez *flana* da hini ar ger *lubana*).

Sk. : Goude beza lavaret droug diwar va fouez, emañ bremañ o klask flana ouz an (Pleiben ha tro-war-dro).

FLANER, ano gourel. Nep a zo troet da flana.

FLOKENN, ano gwregel. Bragezenn, gar eur bragou.

Sk. : Roget eo va flokenn gleiz (Gwezeg).

FLODA, verb. An hevelep talvoudegez ha *flana* en deus ar ger-mañ, met n'eo ket ken implijet (Pleiben ha tro-war-dro).

FLODER, ano gourel. Nep a zo troet da floda.

GANUS, ano gwan. Troet da ober kriz, da wall-skei. « Brutal », e galleg (Daoust hag ar ger *ganus* ne vefe ket eun distresadenn eus *ganus* ? Gwelit ar verb ganuza).

Sk. : Eur gwaz ganus, eur vaouez c'hanus (Pleiben ha tro-war-dro).

GANUZA ha *ganuzi*, verb. Ober kriz da..., gwall skei gant... ; « brutaliser », e galleg.

Sk. : Pec'hed hoc'h eus o c'hanuza an den-se (Pleiben).

GLOUD, ano gourel ; liester : gloued. « Hibou », e galleg. « Chouette » a zo kaouenn, e brezoneg (Pleiben, Gwezeg...).

GURUGELL, ano gwregel. C'houezigell, gwezegell.

Sk. : Eur c'hurugell vras a oa e kof ar pemoc'h lart (Pleiben ha tro-war-dro).

CHOUPA, verb. Dougen eur bugel war ar vrec'h.

Sk. : Deuit amañ, va merc'hig, ma vezoc'h choupet ganin (Alies e vez klevet ar vugale o lavarout en o yez : « Grit choup d'in, tad. » (Pleiben ha tro-war-dro).

JOA-VIL, ano gwregel ; liester : joaiou-vil. « Déception », e galleg.

Sk. : Eur joa-vil am eus bet o c'houzout ne oa ket gwir an dra-mañ an dra (Pleiben ha tro-war-dro).

MILASTRENN, ano gwregel. Eur skourjez, meur a lerenn outi, da frea ar vugale.

Sk. : Chomit reiz, bugale, pe, bremaik, ho po ar vilastrenn (Gwezeg).

YEUN AR GO.

(da genderc'hel)

An Oustacha ha dieubidigez Kroatia

Pa glevjod evit ar wech kenta ano eus an *Oustacha* hag an *Oustachi* e oa er bloaz 1936, da vare prosez Aeks e kreisteiz Bro-C'hall. E miz Here 1934 muntre-rien dianav o doa lazet e Marsilho Aleksander, roue Yougo-Slavia, hag ar ministr gall Barthou war eun dro. Tapet e voe krog en eur C'hroatad : Kalemén, a voe kastizet gant ar maro. D'ar poent-se e voe lakaet ar Frañsizien da gredi — rak ar c'helaouennou hel lavare — e oa het sevenet ar muntridigez-se gant izili eur gevredigez kuz, renet gant eur forban touet : Ante Pavelic, hizio pennrener ar vro dieubet. Goulenn a raed groñs kastiza an den-se, penn-kaoz da gement a wall. Edo Ante Pavelic, d'ar c'houlz-se en toull-bac'h e Torino. Tamallet e voe ha didamallet pelloc'h.

Hol lennerien a garfe gouzout ez reiz petra a oa an « Ustasa ». Setu amañ ar pez a veze diskleriet e reolennoù ar strollad : Kevrenn genta : An Ustasa (distagit : Ous-ta-cha), emzao dispac'hel kroatat, a zo he fal dieubi Bro-Kroatia, he disamma diouz yeo an estren dre nerz an armou, ober anezi eur Stad frank ha dishual a reno war an dachennad-bro en he fez gouestlet d'ezi a-berz an istor hag ar vroad-tud o veva enni.

Urziat e oa ar strollad diouz ar gwella. Bez' e oa anezañ « tabor-iou » (Kampou). « logor-iou » (Strolladou-kampou), « stezer-iou » (Bodadou-gourc'hemenn Meur), hag eur *Glavni Ustaski Stan* (Gourc'hemennva-Meur).

E penn ar G.U.S. e oa ar Rener, ar *poglavnik*.

An izili a vez *Ustasi* anezo. Evit beza Oustacha e oa ret beza Kroatad, den a vrud vat, ha dieub. Setu amañ al le a veze touet gant an izili :

« Toui a ran dirak Doue Holl C'halloudek ober atao diouz kredennou ar Strollad, senti ouz e reolennou ha seveni hep klask abegou an holl urziou a-berz ar *poglavnik*.

« M'hen tou e stourmin e renkadou an Oustachi evit kroui eur Stad Kroat dishual. Mar deu d'in terri al le mañ r'am bo ar maro da gastiz. R'am skoazello Doue ! »

Piou eo an Ante Pavelic-se, a voe barnet d'ar maro evit e oberiantiz war dachenn ar bolitikerez ?

Eur breutaer brudet a oa anezañ. Dileuriet e oa bet ivez evel kannad ar Groated e Kambr Yougo-Slavia. E 1936, oadet a bemp bloaz warn-ugent, en em gave-heñ prizoniet e Torino. Setu petra en doa diskleriet da unan a oa aet di d'e weladenni :

« Oustacha oun, hag ez oun, peogwir ez oun Kroatad. Serbia a zo eur vro. Bro all eo Kroatia. Yougo-Slavia avat n'eo tamm bro ebet, eur vro ijinet ne lavarant ket. Kichen-ha-kichen e-doug trizek kantvedad, o deus bevet Kroatia ha Serbia dieub ha distag. Emañ Bro-Serbia er Balkaniou, keit ha m'emañ Kroatia en Europ. Disheñvel omp dre ar relijion, dre ar sevenadurez, dre ar gwad. Er bloavez 1929 am boe tro da gomz ouz an den-a-stad serbiat Nikolaz Pachitch. Lavarout a ris d'ezañ ne felle ket d'ar Groatiz beza Yougoslaviz. « Gouzout a ran ervat, emeve. E Korfou pa'z eus bet meneg eus unani hon diou bobl evit o envel : Yougoslavia, respontet am eus n'helled ket kroui poblou diouz ar greizengelc'h, diwar froudenn tud. » Ar bobl groatat en he fez, hag hor Strollad, eme rener an Oustachi, a zinac'h galloud ar vro estren war o bro-i. Dibabet eo hon izili

gant ar brasa aked, hep na ve sellet ouz an oad hag ouz ar reiz, gant mar karint ervat o bro, ha gant ma renint eur vuhez enorus. Broad all ebet n'he deus anavezet biskoaz dindan beli alouberien estren, renadurez ken kriz evel ma rank bremañ gouzañv ar Groated. »

*
*
*

Taolomp eur sellig bremañ war istor Kroatia. Ken abred hag ar VII^{vet} kantved e voe krouet ar Stad kroat, HRVATSKU e yez ar vro. Adalek ar bloaz 925 e oa bet eur Stad galloudek ha kristen gant ar roue Tonislaw e penn. Ar stêriou Drava ha Danao, diouz eun tu, Mor Adria ha Kattaro diouz an tu all a oa gwechall hevennou Kroatia. Slavonia, Dalmatia, Bosnia hag Herzegovina o veza kenstag outi, brasoc'h bro e oa eget Serbia eget Bro-Hellas, Holland hag Aostria, gant ugent milion a dud.

Zagreb (Agram ar C'hermaned hag Hungariz) a zo ar gêr-benn. War ar stêr Sava emañ, 108.000 a dud a vez o vev enni. Eur Skol-Veur brudet a vez e Zagreb abaoe ar bloaz 1874 a drugarez d'eun eskob an Aotrou Strossmayer, rener speredel ar Groated.

Adalek 1835 e weljod ar vro oc'h adsevel, an deskadurez oc'h en em leda, he lennegezh o kreski. Krouet e voe evit se eur strollad gouiziek anvet *Matica Hrvatska* da lavarout eo : Mamm-wenanenn ar Groated, o veza ar vamm-wenanenn arouez an holl Slaved.

Araok ar brezel 1914-1918 e oa Kroatia lodenn greisteizel an Impalaerded Aostriat-Hungariat hag a oa daoubennek abaoe 1867. E Bro-Vagyar e voe fiziet. Dieub awalc'h e veze Kroatiz neuze, hag o doa zoken eur Breujou Broadel d'o ren.

E 1918 he doa diskleriet Kroatia e oa anezi hiviziken eur vro dizalc'h. Daoust da se avat e voe lakaet diwezatac'h da genlodi e Rouantelez ar Serbed, Kroa-

ted ha Slovened pe Yougo-Slavia, dre youl ar Gevredidi ha dre feur-skrid Versailles. *O zu a gemeras Serbed ar rouantelez diwar ar stagidigez-se evit ma-c'homi e pep giz o c'henvroiz nevez, ar Groated dreist-holl, d'o serbekaot penn-kil-ha-troad**. Dindan ar roue Aleksander Kenta e voe kaset en-dro ar vac'homerezh-se diouz ar gwas. Kalz tud a vage kasoni outañ, ha setu perak moarvat e voe lamet e vuhez digantañ gant eur C'hroatad anvet Kalemén. Dindan renadurezh ar Priñs Paol e voe gwellaet an darempredou etre Serbed ha Kroated eun distera. Padal, eur pemp milionad Serbed a vestronie bepred 14 milion a dud. Koulskoude eo trec'h ar boblañs kroatat, hag a-bell, e teir rannvro kroatat-rik. E Kroatia, ar Srijem ha Medjurmurje lakaet e-barz, eo 66 dre gant o c'hementad, e Dalmatia 81 dre gant, e Bosnia-Herzegovina 53 dre gant. En teir rannvro-se ez eus en holl 6.081.000 den, ha 4.441.000 anezo a zo Kroated a ouenn. Niver bras a Groatiz, eur 1.476.000 bennak, o deus ranket divrôa, kuit a c'houzañv beza mac'homet.

En Amerika ar C'hreisteiz, en Aostralia, er Zeland Nevez hag en Afrika an Traoñ ez int ar stanka. Ha pa gont ar re-se gant ar re chomet er vro, neuze eo Kroatiz niverusoc'h eget ar Serbed o-unan.

* * *

Evel eur stad er stad e Yougo-Slavia e veve ar Groated emsavet. Eur moneiz a ratoz a lakaent da redek kenetrezo. Medalennet e veze ar re o doa graet eur vad bennak d'an Emsao. Ar medalennou-se a zouge al lizerenn U (Ustasa), eur c'hreunadenn flammek en he c'hreiz, war an tu all eur skoed karrennaoek, ardamez ar vro, gant ar ger-stur : ZA

* Diwar dasorc'hidigez speredel Kroatia lenn : *Prederiadennou* M. Modiern. Gwalarn, niv. 76, ar pennad XIX ha dreist-holl adalek ar bajenn 108 betek arbajenn 114.

NEZAVISNU DRZAVU HRVATSKU. Embannet e veze ivez kartennoù Kroatia — evel ma vije. Douja a raed ar banniel gwenn ha ruz.

Da c'hopr evit dalc'husted didrec'hus soudarded Ante Pavelic niverus hag urziet mat, e tostae evit pemp milion Kroatad eur ar frankiz. An 10 a viz Ebrel 1941 e teue ar C'hermaned e-barz kêr Zagreb. Ar jeneral kroatat Kvaternik a zisklerie er skingomzerezh dieubidigez Kroatia. An ofiserien, is-ofiserien, kargidi, hag all... a doue al le e chomjent feal d'ar stad nevez. Echu e oa evit Kroatiz ober brezel evit diwall frankiz reou all enep d'ezo. Strollad ar Gouerien a en em unane gant hini Ante Pavelic, an Doktor Matchek e-unan a zileze Belgrad evit dont e gouarnamant ar jeneral Kvaternik. Sevenet e oa en diwez tonkadur Kroatia adsavet.

KERLANN, Ebrel 1941.

E-touez ar c'helaouennou hag ar c'hazetennou

Saludomp da genta daou genvreur nevez war dachenn ar brezoneg : « Galv » ha « La Bretagne ».

GALV. *Galv* a zo anezi eur gelaouenn vizek nevez-embannet e Roazon. Skrivet eo e brezoneg nemetken. He fal : studia an holl gudennou a sell ouz da-zont Breiz. He danvez : ar politikerez ne c'hell ket ar c'helaouennou brezonek all pleustri warnañ, peogwir ne labouront peurvuia nemet war ar yez.

Koumanant-bloaz : 10 skoed. Bruchet, 36, rue de Fougères, ROAZON. C.C. Rennes 37669.

LA BRETAGNE. Gant an deiz kenta eus an nevez-amzer eo difluket e Roazon eur gazetenn nevez a vez kavet enni bemdez eur pennad brezoneg. Ar skrivagnerien Alan hag Herve n'emañ ket o brezoneg ganto da zeski. Marteze zoken dre ma skrivont evit eun niver bras a dud, e vefe gwelloc'h d'ezo beza eun tamm « eeunoc'h », gant ma ne gouezfent ket en trefoedaj, evel just. Hor gourc'hemennou kalonek d'Alan hag Herve.

GWALARN. Niverenn Ebrel hor c'helaouenn veur Gwalarn a zegas d'imp barzonegou gant ar mestr Maodez Glanndour ; eun droidigez diwar oberou Dafydd Ab Gwilym, gant ar c'hembraeg hag ar brezoneg keñver-ouz-keñver. Yeun ar Go, Mevenn Mordiern, Gawain, L. Dujardin o deus ivez kenlabouret d'ober eus an niverenn-mañ unan eus ar plijusa.

STERENN. Sterenn miz-meurz a zo anezi eun droidigez eus *Makbeth*, pez-c'hoari Shakespeare. Labour eun den-a-vicher ; aes eo reizout e oar R. Hemon koulz ar Saozneg hag ar brezoneg. Priz an niverenn : 5 skoed. Koumanant-bloaz : 100 lur.

Skriva da *Walar*, B. P. 75, Brest.

STUDI HAG OBER. En niverenn 13 (Pask 1941) eur pennad kaer-tre : « Hent ar Basion », gant Maentan.

Eur pennad a-bouez : « Rannadur ar Brederou-riez », gant Maodez Glanndour. Koumanant bloaz : 5 skoed. — Abad L. ar Floc'h, kure e Gwengamp. — C.C. Rennes 34.212.

FEIZ HA BREIZ. Niverenn meurzbrel 1941. Dizoloet en deus an Ao. an Diberder dournskridou eur skrivagner koz, Laurans ar Richou e ano. Rei a ra d'imp eun tañva eus e oberou gant « Ar Basion vrezonec », savet e 1678, hag a ro c'hoant bras d'imp da lenn « ar Resurrection » ma vo kavet arroudou diwarni war niverenn « Feiz ha Breiz » a zeu. Koumanant bloaz : 20 lur. — Y.V. Perrot, Scrignac. — C.C. Rennes 21.802.

KELEIER

SKOL VREZONEG SAV. E Ker-Vreiz, 43, rue St Placide e Paris, 6^e, e vez skol vrezoneg peder gwech ar sizun. Er skol izel ez eus daou rummad kenteliou, ar rummad kenta, d'ar meurzbrel, an eil d'ar yaou. Ar skol etre a vez bep sadorn ; hag ar skol uhel, d'ar gwener. Niverus eo ar skolidi, paotred ha merc'hed, koz ha yaouank ; ha kement a galon a lakaont da zeski ma 'z eus meur a hini gouest da dremen an

Trec'h. Arnodennou an Trec'h a zo bet tremenet e Ker-Vreiz, d'ar sul 11 a viz Mae.

AN TREC'H KENTA. En arnodennou bet dalc'het e Roazon d'an 30 ha d'an 31 a viz meur, a zo bet kavet barrek da c'hounit an Trec'h Kenta : an Ao.Ao. F. Debauvais (meneg mat-tre ha meuleudi ar varnerien) ; Job Morvan (meneg mat) ; an It. Debauvais (meneg mat) ; an Ao.Ao. Loeiz Morvezen (meneg mat), Adrien Allan (meneg mat a-walc'h), J. Queinnec.

ARNODENNOU AN TREC'H. Eun arnodenn (Trec'h Kenta ha Trec'h Meur) a zo bet dalc'het e Kemper d'ar yaou 7 a viz mae.

Arnodennou all a vo aozet dizale e Naoned, hag e lec'h all c'hoaz. Kement hini en defe c'hoant tremen a zo pedet da skriva da : Mlle M. Gourlaouen, 30, rue de la Corderie, Douarnenez.

RADIO-BREIZ. E-doug miz c'houevrer e voe klevet er radio eun abadenn anvet « O weladenni Brezoned Pariz ». Ar c'han hag ar barzonegou koulz hag ar c'homz-plaen a voe holl e brezoneg penn-dabenn. S.A.V. ha Nevezadur eo a aozas an abadenn.

Ken plijet e voe an dud gant an abadenn-se, ma voe goulennet adarre digant an daou strollad-se ad-kegi, e miz Ebrel, gant eun abadenn anvet : « war-lerc'h ar Pardon ». E-doug miz-mae e vo klevet adarre brezonegerien Pariz gant eur pezh-c'hoari fentus e brezoneg.

Meulomp ivez laz-c'hoari Gwalarn-Arvor, a vez eun dudi e glevout e Radio-Breiz eur wech ar miz. Sede a ziskouez n'eo ket yez hor mammou-koz yez ar war-lerc'hidi, hogen kenkoulz ha ne vern pehini da ziduella hor c'henvroiz.

SKOL IWERZONEG. Ar « Panceltic League » a ro da anaout e vez roet ganti, evit netra, kenteliou iwer-

zoneg dre lizer. Aozet e vez ar c'henteliou-mañ e brezoneg-iwerzoneg, galleg-iwerzoneg, saozneg-iwerzoneg.

Respontet e vez ivez da gement hini en deus c'hoant kaout diskleriadennoù diwar-benn Bro-Iwerzon. Skri-va da : Dimezell Jigouzo-O'Gallagh — Boite postale 101, La Baule (L.-I.).

KANVOU. An naontek a viz meur — deiz gouel Sant Joseb — e voe galvet da Zoue merc'h yaouanka hor mignon G.B. Kerverziou. Ra vo evurus an aelig-se pignet d'ar baradoz dindan kazel patron ar maromat. Ha ra gavo amañ he mamm hag he zad hag he c'hoarezed hor gourc'hemennou a genglac'har dirak eun taol ken kriz.

EURED. Ar sadorn 5 a viz Ebrel, e voe lidet en iliz Sant Yann Badezour e Pariz, eured hor c'henvroidi, Youenna Goraguer eus Landeveneg gant Youenn Kersual, studier-apotiker e Pariz.

Dindan heol-splann an nevez-amzer e lugerne voulou ha seiz an dilhad giz-Breiz, rak niverus e teuas yaouankizou Nevezadur, strollad kanerien ha korollerien vrezon kêr-Bariz, eo Youenn Kersual ezel anezañ abaoue an deiz kenta.

D'ar priedou yaouank ha d'o zud hor gwella gourc'hemennou ha hetou a evurusted.

TI-LOUZOU AR POST

Marsel AODIG

(apotiker eus skol-veur Pariz)

4, Str. E. Cresson (18 Bali Orleans) **PARIZ** (XIV^e)

LOUZEIER-MERK

LOUZEIER KEMENNET GANT AR MEDISIN

DROGEREZOU

C'HOUEZ VAT, SOAVON, HAG ALL...

Kaset e vez ar varc'hadourez da di an dud

Pell. SUFiren 30-35

BREZONEG EN TI

ON PARLE FRANÇAIS

LENN HA STUDIA :

- La Langue bretonne* en 40 leçons,
gant F. VALLÉE 18 l.
- Geriadur Brezonek-Gallek*, gant ER-
NAULT 18 l.
- Grand dictionnaire français-breton*,
gant F. VALLÉE 75 l.
- Les Mots français et bretons, classés*
d'après le sens, gant VALLÉE 10 l. (levr. I)
. 8 l. (levr. II)
- Notennou diwar-benn ar Gelled*,
pep levrenn hep geriadur 3 l.
gant geriadur 4 l.
- Sketla Segobrani*, pep levrenn 8 l.

E GWERZ E TI MOULEREZ BRO-LEON,
RU LAFAYETTE, LANDERNE

It da zebri da diez

JOS-BEUZEN

(eus ar C'hlostr-Pleyben)

27, rue Vandamme — 18, rue Mayet

38, rue Monsieur-le-Prince

KRAMPOUEZ, STRIPOU, KIG SAL HAG ALL

" S A V "

Kelc'h-gelaouenn drimiziek

(quaterly — Revue trimestrielle)

koumanant bloaz : 20 lur

Kas an arc'hant d'an Aotr. Daniel
9 ter, rue de Rouvray, Neuilly (Seine)

C. C. 1902-50 Paris